




**DIAGNOSTIK
STAD AR BREZHONEG
E BRO TREGER-HA-
GOUELOÙ
DOARE NEVEZET 2004-2009**

**POL STUDI HA DIORREN
ARSELLVA AR BREZHONEG
2009**

Digoradur

Ur steuñv hollek da ziorren ar brezhoneg, Brezhoneg 2015, a oa bet savet gant an Ofis e 2003. Diazezet e oa war stad wirion ar yezh a-benn ober kinnigoù uhelek met fetis evit suraat he dazont. Kement ha kinnig ur steuñv pleustrek da vat e oa bet divizet e zisplegañ dre vro¹, anezhi ur vent dereat evit tostaat da wirvoud an dachenn.

Daou deul a oa bet savet evit pep hini eus an 29 bro zo e Breizh : un diagnostik ha palioù diorren. Kavout a ra dimp eo deuet ar mare da nevezñ ar studadennoù bet savet neuze ha d'ober bilañs an emdroadurioù zo deuet abaoe. Ra sikouro an diagnostik nevez-mañ, savet diwar an holl roadennoù hon eus dastumet hag e darempred gant an oberourien war bep tachenn, da sevel ur politikerezh yezh efedus.



*Lena Louarn,
Prezidantez Ofis ar Brezhoneg*

¹ Diwar ur genstagded douaroniel, armerzhel, sokial ha/pe sevenadurel eo treset ar broioù bet termenet gant al lezenn “Voynet“ e 1999. Ar broioù-se an hini eo a implijer er steuñv-mañ.


Taolenn

PLEGENN BRO TREGER-HA-GOUELOU	4
Sifroù pennañ bro Treger-ha-Goueloù	5
Dibarderioù bro Treger-ha-Goueloù.....	6
Brezhonegerien bro Treger-ha-Goueloù.....	6
AR BREZHONEG EN DESKADUREZH	8
Kelenn er skol	9
Kelenn divyezhek	9
Dasparzh ar c'hinnig.....	9
Poblañs deskidi ar c'helell divyezhek.....	12
Stadegoù ar c'helell divyezhek	17
Kelenn brezhoneg.....	21
An tañva brezhoneg er c'hentañ derez.....	21
Ar c'helell brezhoneg en eil derez	21
An deskadurezh uhel	25
Ar c'helell d'an oadourien	25
PREDER AR BED FORAN	29
Politikerezh yezh an departamant	30
Penaos e vez kemeret ar brezhoneg e kont gant an departamant.....	30
Ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg gant an departamant	31
Kevrat bro Treger-ha-Goueloù	35
Oberoù ar strollegezhioù lec'hel	35
<i>Ya d'ar brezhoneg</i>	37
OBER GANT AR BREZHONEG ER GEVREDIGEZH KEODEDEL	40
Treuzkas ar yezh	40
Servijoù d'an dud	40
Bed ar vugaligoù	41
Dudi	42
Dudi evit ar vugale	42
Dudi evit an oadourien	44
Buhez speredel	46
An embann	46
Ar mediaoù	46
Ar c'hazetennoù	46
Er skinwel.....	47
Er skingomz	47
Marc'had al labour e brezhoneg	49
An armerzh	50
KLOZADUR	54
STAGADENNOU	57
LEVRLENNADUR	60
MAMMENNOU	60

Plegenn bro Treger-ha-Goueloù

Kinnig bro Treger-ha-Goueloù - 2008






Sifroù pennañ bro Treger-ha-Goueloù

Niver a gumunioù	69
Poblañs hollek e 2006	117 956
Emdroadur ar boblañs etre 1999 ha 2006	+4,7%
Gorread	1 034 km ²
Stankted ar boblañs	114 ann./km ²

Emdroadur poblañs ar c'humunioù etre 1990 ha 1999



Dibarderioù bro Treger-ha-Goueloù

Unan eus broioù krenn Breizh eo bro Treger-ha-Goueloù e(keñver poblañs : goude bro Montroulez emañ met kalz a-raok bro Wengamp da skouer. N'eo ket aozet ar vro tro-dro d'ur gêr greiz evel bro Sant-Brieg pe bro Roazhon. Daou bol pennañ zo : Lannuon ha Pempoull. N'eus nemet teir c'humun gant ouzhpenn 5 000 annezad (Lannuon, Pempoull ha Perroz-Gireg). Kumunioù war ar maez eo a ya d'ober ar pep brasañ eus kumunioù ar vro. Etre an arvor hag an argoad emañ bro Treger-ha-Goueloù. Er c'hornôg eo aozet ar vro en-dro da Lannuon e-lec'h m'eo kreizennet an armerzh tro-dro d'ar greanterezh elektronek ha d'ar pellgehentiñ war un dro hag er reter en-dro da Bempoull, Plougoustant hag ar C'hourenez, bro broduerien legumaj abred. Pol pennañ ar servijoù eo tolpad-kêrioù Lannuon. Harpet eo gant Pempoull e reter ar Vro, liammet muioc'h ouzh takad labour Sant-Brieg.

Bras eo an obererezh touristel er vro, gant ar glad naturel pinvidik (un toullad takadoù natur zo) hag an 250 km a aodoù. Ha pa goshafe poblañs ar vro e kendalc'h da greskiñ (+2,8% etre 1999 ha 2005) a-drugarez annezidi nevez deuet d'en em staliañ e Lannuon (+10% etre 1999 ha 2006) hag er c'humunioù tro-war-dro (e Louaneg da skouer +22% e-pad ar memes prantad).

Hervez brasjedadennoù senario uhel an imbourc'herezh bet savet gant an EBSSA e c'hellfe bezañ **war-dro 121 500 a annezidi e bro Treger-ha-Goueloù e 2015 (+5,3% e-keñver 2005)** hag ouzhpenn 126 000 annezad e 2030 (+9,3% e-keñver 2005), ar pezh a vefe izeloc'h eget kresk keitat ar rannvro.

Brezhonegerien bro Treger-ha-Goueloù

Dibarderioù brezhonegerien bro Treger-ha-Goueloù

Kaset e oa bet da benn ur sontadeg diwar-benn an ober gant ar brezhoneg e miz Du 2000 gant Le Trégor –TMO région, e bro Treger-ha-Goueloù a-bezh war-bouez e kantonioù Pempoull ha Lezardrev. Sellet a ra an enklask-se ouzh an tri-c'hard eus poblañs ar vro neuze. Ha pa vefe koshaet un tammig roadennoù an enklask-se e tegas sifroù war an niver a vrezhonegerien er vro zo pishoc'h eget er broioù all.

Gant bro Kornôg Kreiz Breizh ez eo bro Treger-ha-Goueloù **ar vro m'emañ en e uhelañ an dregantad a vrezhonegerien er boblañs**. Kadarnaat a ra an enklask-se e kosha ar vrezhonegerien, met elfennoù ouzhpenn zo bet degaset gantañ : er c'hantonioù bet kêriakaet ar muiañ eo e kaver an dregantad a vrezhonegerien izelañ. E kanton Lannuon e veze kavet an dregantad izelañ er vro. Ret eo keñveriañ an titouroù-se gant elfennoù roadennoù ar skolioù : er c'hanton-se just a-walc'h e kaver tost an hanter eus skolidi divyezhek ar vro. An darn vrasañ eus ar vrezhonegerien zo o chom war ar maez. Met an darn vrasañ anezho zo tud en oad ar pezh n'eo ket ken gwir er c'hêrioù. Yaouankoc'h eo ar vrezhonegerien zo o chom e kêr. Dre-vras eo yaouankoc'h brezhonegerien ar vro eget er peurrest eus Breizh-Izel.

Da-geñver niveradeg 1999 en doa savet an EBSSA un enklask anvet *Étude de l'histoire familiale*. Kenlabouret en doa an Ofis ganto evit dielfennañ an disoc'hoù. En enklask-se e oa goulennoù a denne d'an ober gant ar yezhoù er gêr ha drezo e oa bet dastumet roadennoù a c'haller fiziout enno evit an niver a vrezhonegerien deuet d'o oad gour dre zepartamant. Kadarnaat eo bet gant ar roadennoù-se e kosha brezhonegerien kornôg Breizh (ha re bro Treger-ha-Goueloù neuze).

Diwar ar sifroù-se, diwar sifroù ar c'helenn divyezhek ha diouzh dibarderioù pep bro ez eus tu da sevel brasjedadennoù war an niver a vrezhonegerien e pep takad. E-se e




c'hellomp lakaat e oa etre 30 000 ha 35 000 brezhoneger o chom e bro Treger-ha-Goueloù e 1999, da lavaret eo war-dro 28,5% eus ar boblañs (pa save ar feur-se da 6,7% e Breizh a-bezh).

Da-heul e c'hellomp brasjediñ ivez **e vefe war-dro 25 000 brezhoneger e bro Treger-ha-Goueloù e 2008**, da lavaret eo war-dro **20%** eus poblañs ar vro (pa savfe feur Breizh da 4,7% dre-vras). **Etre 5 ha 10 000 yezher a vefe aet d'an anaon** er vro etre 1999 ha 2008 tra **ma'z eus bet nebeutoc'h eget 500 deskard ouzhpenn** er skolioù divyezhek. Gant ar geñveriadenn-se, **feur adneveziñ brezhonegerien bro Treger-ha-Goueloù a vefe tro-dro 1 dre 20**, da lavaret eo e stummer ur brezhoneger nevez pa ya 20 d'an anaon. **An hanter izeloc'h eo ar feur-se er vro eget e bro Brest (stummañ a reer ur brezhoneger nevez eno pa ya dek d'an anaon).**

Ar brezhoneg en deskadurezh

Ar c'heleñn kinniget – Bloavezh-skol 2008/2009



E 18 kumun eus bro Treger-ha-Goueloù e kaver da nebeutañ un doare bennak da zeskiñ ar yezh pe da gaout un tañva eus ar brezhoneg. Ur c'hard eus kumunioù ar vro ez eont d'ober. Izeloc'h eo ar c'hinnig er vro eget an hini a gaver e bro Brest ma c'haller deskiñ ar yezh mod pe vod en hanter eus ar c'humunioù (gant an tañva er c'hentañ derez). Diorroet-mat eo ar c'heleñn er vro met lakaat a ra ar gartenn-mañ war wel eo digempouez ar c'hinnig etre kornôg ha reter ar vro.

E 55 eus an 69 c'humun a ya d'ober ar vro e c'heller skoliata bugale. 12 anezho a ginnig ar c'heleñn divyezhek (3 ouzhpenn e-keñver 2004 : Rospez, Louaneg ha Perroz-Gireg). N'eo ket bet diorroet an tañva brezhoneg e skolioù ar c'hentañ derez evel m'eo bet graet e broioù Penn-ar-Bed (diwar atiz an departamant) : n'eus nemet ur skol a ginnig un tañva yezh e Logivi-Plougraz. E kreisteiz ar vro emañ, tost da gumuniezh kumunioù Kallag m'eo kreizennet ar c'hinnig tañva en departamant. Chom a ra c'hoazh 40 kumun, da lavaret eo tost an tri c'hard, enno ur skol da nebeutañ, ma n'hall ket ar vugale deskiñ brezhoneg e mod ebet.

E 2008/2009, **1 255 skoliad eus ar vro**² o deus heuliet kentelioù brezhoneg pe e brezhoneg eus ar skol-vamm d'al lise. Mont a reont d'ober tost da 6% eus ar boblañs-skol (da 5% e save ar feur-se e 2003/2004). Eus 15% eo kresket ar boblañs-se etre prantad 2003 ha 2008, da lavaret eo un tamm nebeutoc'h eget ar pezh zo c'hoarvezet e Breizh e-pad ar memes prantad (+18%). Er c'hentañ derez ez eont d'ober **8,2% eus ar skolidi**. Tost an holl eus an 8,2% zo skoliataet en un hentad divyezhek, an hent gwellañ evit stummañ brezhonegerien. Estregeto e konter **263 den deuet** a zesk brezhoneg (200 e oant e 2003, da lavaret +31,5% a zeskidi ouzhpenn e-keñver distro-skol 2003). Kresket eo an niver a zeskidi gant al labour kaset da benn gant al Levrig evit frammañ ar c'heleñn ha gant ar startijenn zo e Pempoull ivez. Deskiñ a reer brezhoneg dre gentelioù noz er vro. Ne oa bet aozet staj ebet e 2008.

² 968 en hentadoù divyezhek, 69 gant an tañva er c'hentañ derez ha 218 skoliad gant kentelioù yezh en eil derez.



Kelenn er skol

Kelenn divyezhek

➤ Dasparzh ar c'hinnig

Kinnig kelenn divyezhek er c'hentañ derez – Distro-skol 2003

Distro-skol 2008




*E-touez ar broioù m'emañ rouedad ar skolioù divyezhek en he stankañ emañ bro Treger-ha-Goueloù. Tost e pep lec'h er vro emeur dindan 10 km hed eus ur skol divyezhek. Pol pennañ diorren an hentad divyezhek en departamant eo ar vro. N'eo ket bet cheñchet kalz skeudenn ar vro en ur ober pevar bloaz koulskoude. Kreñvaet eo bet ar pol pennañ, hini Lannuon, gant an tri lec'h zo bet krouet e TK Lannuon-Treger abaoe 2004 : Rospezh, Louaneg ha Perroz-Gireg (ha pa ne vefe ket stag ouzh an tolpad-kêrioù ez eo tost-kenañ dezhañ). Abaoe distro-skol 2007 e c'haller heuliañ ur c'helenn divyezhek e trede kumun bobletañ ar vro: Perroz-Gireg. **Chom a ra div gumuniezh-kumunioù hep tamm kinnig ebet : K.K Gourenez Lezardrev ha K.K bro ar Roc'h.***

E-touez ar broioù kentañ o doa degemeret un hentad divyezhek emañ bro Treger-ha-Goueloù : digoret e oa bet skol Diwan Lannuon e 1978, da vare eil distro-skol an hentad dre soubidigezh. E bro Treger-ha-Goueloù e oa bet digoret **ar c'hlas divyezhek publik kentañ** e Breizh : e Lannuon e 1982. Kalz diwezhatoc'h e oa bet klokaet ar c'hinnig er vro gant an trede hentad, pemzek vloaz war-lerc'h, gant ur c'hlas divyezhek katolik e Landreger e 1997. N'eus kumun ebet er vro hag a zegemer en tri hentad asambles. Souezhus eo, pa soñjer ez eo er vro-mañ emañ ar c'helenn divyezhek en e greñvañ, ha pa geñverier gant Gwened, Karaez pe Landerne ma kaver an tri hentad, hag a zo war-un-dro kumunioù kalz a lañs ganto. Lec'h zo evit ar c'helenn katolik da zigeriñ klasoù divyezhek e Lannuon da skouer.

Gallout a reer bremañ enskrivañ e vugale en un hentad divyezhek e tost ur c'hard eus kumunioù ar vro dezho ur skol d'an nebeutañ : e-touez an 55 kumun eus ar vro ma c'heller skoliata ar vugale ez eus 12 a ginnig un hentad divyezhek d'an nebeutañ (3 c'humun evit Diwan, 7 evit an hentad publik ha 4 evit an hentad katolik). N'emañ ket pell rouedad ar vro da vezañ ken stank hag hini bro Brest, an hini stankañ e Breizh (tremen ur c'hard eus ar c'humunioù a zegemer ul lec'h divyezhek e bro Brest). Gallout a ra ar familhoù **bezañ skoazellet gant an departamant** e-keñver ar frejoù treuzdougen o devez evit kas o bugale d'ur skol Diwan pe d'ur c'hlas divyezhek. Gallout a reont tennañ splot eus ur stignad n'eo ket bet soñjet evit ar c'helenn divyezhek hepken : an darn vrasañ eus ar skoaziadennoù hiniennel (da lavaret eo digolloù a resev ar skolidi pa ne vez ket a dreuzdougen boutin aozet gant an departamant evit mont d'ar skol) a vez implijet gant skolidi a zo skoliataet er skolioù Diwan pe er c'hlasoù divyezhek. Ne sell ket ar skoaziadennoù-se ouzh ar skolioù-mamm avat.

Kendalc'het he deus ar rouedad divyezhek d'en em astenn er vro goustadik : 3 c'humun ouzhpenn (Rospezh, Louaneg, ha Perroz-Gireg) zo bet digoret ur skol divyezhek enno e-keñver ar pezh a oa e 2003/2004. An deskadurezh katolik ha Diwan a zo aet war-raok gant daou lec'h katolik nevez hag ur skol Diwan nevez digoret (ar skol gentañ digoret er vro abaoe 1984). **N'eus bet digoret lec'h publik nevez ebet abaoe 2002** (Plounevez-Moedeg). Un diouer a ginnig eo ha n'eo ket un diouer a c'houlenn : klasket en doa ur strollad kerent digeriñ un lec'h divyezhek e Tredraezh-Lokemo da skouer ; n'eo ket deuet ar raktres da wir daoust d'ar goulenn kreñv.

Ur c'hinnig nes n'eo ket a-walc'h ha kalz a dud a blijfe dezho kaout ur c'hinnig divyezhek er skol m'o deus enskrivet o bugel pe en hentad dibabet ganto. **Peadra zo c'hoazh da vont war-raok neuze pa seller ouzh rouedad pep hentad unan-hag-unan ha pa vuzulier e vefe ret gortoz 2025, ma talc'hfed gant ar memes lusk, a-raok kaout ur skol divyezhek en hanter eus kumunioù ar vro dezho ur skol da nebeutañ.**



N'eus nemet e hentad publik Lannuon e c'haller kenderc'hel gant ar c'helenn divyezhek en eil derez. N'eo ket aet war-raok tamm ebet ar c'hinnig en eil derez etre 2004 ha 2008.

Isdiorroet eo ar c'hinnig en eil derez e-keñver ar c'hentañ derez pa ranker ober muioc'h a hent evit kenderc'hel gant an hentad. Kalz a vugale a zilez an deskadurezh divyezhek en abeg d'an dra-se.

Diwar an 12 lec'h divyezhek zo er c'hentañ derez, 7 ne c'hallont ket kinnig ur c'helenn en eil derez peogwir n'eus skol eil derez ebet er gumun : Kawan, Louaneg, Perwenan, Ploubêr, Plounevez-Moedeg, Rospezh ha Tregastell. 4 anezho zo stok ouzh takad Lannuon. Stag eo Kawan ouzh Bear ma z'eus bet digoret un hentad divyezhek e 2006. Kreñvaet e vefe ar c'helenn brezhoneg a zo er skolaj c'hoazh ma c'hallfe digeriñ un hentad divyezhek en eil derez. Perwenan a c'hallfe bezañ stag ouzh Landreger ma vefe un hentad en eil derez eno. Plounevez-Moedeg a c'hallfe bezañ stag ouzh skolaj Benac'h ma vefe digoret en eil derez. Klasket e oa bet digeriñ un hentad divyezhek er skolaj evit degemer skolidi Benac'h ha Louergad. Kreñvaet eo bet an hentad c'hoazh gant digoradur lec'h Plounevez-Moedeg.

Evit ar pezh a denn da Ziwan, emañ ar skolaj tostañ e bro Gwengamp : gallout a ra skolidi Lannuon, Louaneg, Pempoull ha Plounevez-Moedeg (pa vint en oad da vont d'an eil derez) mont da Blijidi zo 50 kilometr eus o skolioù. Pakañ a ra skolaj Diwan skolidi eus an hentadoù par-ouzh-par ivez (evel bugale Kawan da skouer), desachet gant kalite an divyezhegezh en eil derez Diwan.


Diwar ar pevar lec'h divyezhek ma'z eus ur skol eil derez er gumun e c'hallfe bezañ digoret un hentad divyezhek c'hoazh en eil derez e tri anezho, da lavaret eo evit ar skolidi zo en oad da vont d'ar skolaj e Plistin (digoret er c'hentañ derez e 1999), Pempoull (digoret e 2000 evit an hentad publik) ha Landreger (digoret e 1997). Met re en o-unan emañ al lec'hioù-se evit ma c'hallfe bezañ diorroet mat an hentad en eil derez. Neuze n'eo ket gwall niverus e gwirionez an hentadoù a c'hallfe bezañ digoret er vro war verr dermen. **Ezhomm zo da grouiñ skolioù nevez er c'hentañ derez a c'hallfe harpañ digoradurioù en**

eil derez tro-dro da Bempoull, Plistin ha Landreger da gentañ, lec'hioù ma chom ar skolidi a-sav gant ar c'heleñn divyezhek en eil derez.

➤ Poblañs deskidi ar c'heleñn divyezhek

Gant **968 skoliad divyezhek** e distro-skol 2008 eo bro Treger-ha-Goueloù ar pevare bro ma kaver ar muiañ a skolidi divyezhek.

Dasparzh ha niver ar skolidi divyezhek – Distro-skol 2008




Ur pol pennañ a gaver e bro Treger-ha-Goueloù, a-us ar re all : hini Lannuon staliet abaoe penn kentañ an hentad divyezhek (ar sifroù dre gumun, dre hentad ha dre live a gaver er stagadennoù (p 59))

E-kichen pol pennañ ar vro e kaver lec'hioù etre met en o-unan peurliesañ evel Plistin, Pempoull, Kawan pe Plounevez-Moedeg. Kumun Lannuon zo pempvet kumun divyezhek Breizh hag eil lec'h an hentad publik (goude Roazhon). Er vro-mañ, ouzhpenn ur skoliad divyezhek diwar dri (37%) zo skoliataet e kêr Lannuon. Met brasoc'h eo perzh Lannuon e poblañs skol hollek ar vro c'hoazh : tost an hanter eus poblañs skol ar vro zo skoliataet e Lannuon (46%). Digresket eo bet pouez Lannuon e-keñver kumunioù brasañ Breizh. N'eus ket bet e Lannuon ur c'hresk heñvel ouzh ar pezh zo e Gwened, e Roazhon, e Kemper pe e Karaez. E 1999 e oa Lannuon ar gumun a skoliatae ar muiañ a vugale zivyezhek e Breizh. Riklet eo d'ar pempvet renk e 2008. N'eus bet krouet lec'h divyezhek nevez ebet er gumun : 4 skol a ginnig un hentad divyezhek e Landerne pa n'eus nemet 2 e Lannuon.

Pouez kumun Lannuon er vro a zeu eus e hentad publik : an tri c'hard eus skolidi divyezhek Lannuon zo skoliataet en hentad-se. An hentad divyezhek nemetañ eo er vro a ya eus ar skol-vamm betek al lise. An hanter eus skolioù divyezhek ar vro a gaver e Kumuniezh-Tolpad-kêrioù Lannuon hag enno e kaver 60% eus skolidi divyezhek ar vro. Gwelet a reer un


digempouez bras etre kornôg ha reter ar vro. Tost 4 skoliad diwar 5 zo a-gleiz d'ul linenn Kawan, Rospezh, Louaneg.

Keñveriañ lodenn pep framm etrekumunel e poblañs-skol ar vro dre-vras hag e poblañs ar skolioù divyezhek – Distro-skol 2007



Ma vefe ingalet da vat ar c'hinnig war tachenn bro Treger-ha-Goueloù, lodenn pep framm etrekumunel en deskadurezh divyezhek a vefe damheñvel ouzh e lod en deskadurezh dre-vras (ken uhel ha ken uhel e vefe an % glas hag an % gwer war ar grafik). Ar gartenn-mañ a laka war wel lañs kumuniezhioù-kumunioù bihan war ar maez evel hini Kreiz Treger pe hini Beg ar C'hra. Splann eo c'hoazh dreistpouez T.K Lannuon-Treger a vod an hanter eus al lec'hioù divyezhek. Lakaat a ra anat an dale zo bet tapet gant K.K. Pempoull Goueloù, ur gumuniezh-kumunioù poblet met treut ar c'hinnig divyezhek enni evit poent.


Dasparzh an niver a skolidi divyezhek etre an tri hentad etre 2003 ha 2008



Disheñvel eo dasparzh skolidi bro Treger-ha-Goueloù diouzh hini Breizh a-hend-all (kempouesoc'h an traoù e Breizh : Diwan (25%), hentad publik (40%) hentad katolik (35%)).


Bras-kenañ eo pouez an hentad divyezhek **publik** e bro Treger-ha-Goueloù, evel e dasparzh ar boblañs skol hollek (an tri c'hard eus poblañs skol ar vro zo skoliataet er skolioù publik). Un tamm brasoc'h e oa e bouez e 2003 eget e 2008 c'hoazh. Digresket eo un tammig peogwir n'eus bet digoret lec'h ebet etre 2003 ha 2008 en hentad publik. Padal, daou lec'h zo bet digoret gant an deskadurezh katolik (an eil e Rospezh hag egile e Perroz-Gireg). En hentad-se eo c'hoarvezet ar c'hresk brasañ-holl (a-fet dregantad diantav rak gant an hentad publik emañ c'hoazh ar c'hresk uhelañ evit an niver a vugale (+ 163 skoliad)) : daougementet eo bet an niver a skolidi en deskadurezh katolik. Ken bras ha ken bras eo pouez ar skolioù katolik ha hini Diwan er vro bremañ. N'eo ket bet ken bras kresk an hentad publik er vro (+32%) hag e Breizh (+42%) etre 2003 ha 2008). Un digresk zo bet merzet gant Diwan betek 2005 hag ur c'hresk ingal abaoe gant krouidigezh div skol nevez er vro da skouer.

Dasparzh ar skolidi divyezhek dre live en tri hentad – Distro-skol 2008



Heverk eo ar grafiek-se eus stad ar c'helenn divyezhek e bro Treger-ha-Goueloù : dreistpouez an hentad publik e-keñver an daou hentad all, pouez bihan-kenañ an hentad en eil derez evit an tri hentad, ha lañs dister ar c'helenn divyezhek evit kreskiñ er bloavezhioù da zont ma ne zigorer ket lec'hioù nevez (abaoe distro-skol 2008 ez eus muioc'h a skolidi divyezhek er skol-gentañ eget er skol-vamm er vro).

Emdroadur keñveriet an niver a skolidi divyezhek hag an niver a skolidi en deskadurezh dre-vras eus ar skol-vamm d'al lise e bro Treger-ha-Goueloù etre 1999 ha 2008



Ingal e kresk an niver a skolidi divyezhek er vro ha daougementet eo bet an niver a skolidi divyezhek (+100%) e-kerzh an dek vloaz diwezhañ tra m'eo chomet peuzstabil sifroù hollad ar boblañs skol er vro (+1,1 % etre 1999 ha 2007). Klotañ a ra an tuadurioù-se gant re Breizh (+107 % evit ar c'helenn divyezhek ha +1,5% evit ar c'helenn dre-vras). Diskouez a ra al lusk-se eo dedennet kerent ar skolidi gant ar c'hinnig divyezhek hag e vefe ezhomm neuze aesaat ha kenurzhiañ an diorren anezhañ.

Un tamm brasoc'h e oa bet feur emdreñ ar c'helenn divyezhek e bro Treger-ha-Goueloù eget e Breizh etre 1999 ha 2004 (+14% a gresk keitat bep bloaz er vro e-skoaz +11,9% e Breizh). **Ma oa lañs gant Treger-ha-Goueloù er prantad 1999-2004 eo bet**



izeloc'h ar feur greskiñ er vro etre 2004 ha 2008. Kresket eo eus +7,3% bep bloaz e Breizh pa ne greske nemet eus 5% er vro. Kresket eo an niver a skolidi divyezhek er vro eus 3,5% e distro-skol 2008 pa sav ar c'hresk-se da 4,8 % e Breizh.

Keñveriadenn eus kresk an niver a skolidi divyezhek adalek ar skol-vamm betek al lise e bro Treger-ha-Goueloù hag e Breizh etre 1999 ha 2008


	Bro Treger-ha-Goueloù	Breizh
Kresk ar c'humunioù enno skolioù divyezhek e 1999	66,3%	72,3%
Kresk an holl gumunioù enno skolioù divyezhek e 2008		

Evit priziañ lodenn ar skolioù nevez-digoret en emdroadur ar c'helenn divyezhek e c'heller keñveriañ ar c'hresk zo bet dre-vras etre 1999 ha 2008 gant ar c'hresk zo bet d'ar memes koulz er c'humunioù ma oa ur skol zivyezhek dija e 1999. Gant an daolenn a-us e verzer ez eo bihanoc'h kresk bro Treger-ha-Goueloù eget hini Breizh koulz evit ar pezh a denn d'ar c'humunioù pourvezet e 1999 hag evit an holl gumunioù pourvezet e 2008.

E bro Treger-ha-Goueloù, tremen un drederenn (36%) eus ar c'hresk a zeu eus ar c'humunioù pourvezet goude 1999, evel e Breizh.

Da-geñver savidigezh *Brezhoneg 2015 – Ar steuñv hollek da ziorren ar brezhoneg* gant an Ofis e oa bet termenet palioù bloaziek dre vro evit ma vefe 25 000 skoliad divyezhek e Breizh a-benn 2015. Tapet he deus ar vro un tamm dale evit seveniñ ar pal bet lakaet a-benn 2008 : er vro evel e Breizh a-bezh e taper muioc'h-mui a zale evit tizhout ar pal a-feur ma tremen an amzer³.

Emdroadur keñveriet an niver a skolidi divyezhek stadet hag an niver lakaet da bal etre 2003 ha 2015



Lañs he deus bet ar vro betek 2005 e-keñver ar pal bet lakaet. Bihanoc'h eo al lusk kreskiñ abaoe 2006 avat, ha pa oa sañset ar c'hresk mont buanoc'h da-heul politikerezh yezh nevez ar Rannvro en doa lakaet da bal daougementiñ an niver a vugale divyezhek ac'hann da 2010.


³ ne dizher nemet 93 % eus ar pal bet lakaet evit 2008. Heñvel a-walc'h eo e Breizh (93, 6%).

Pal ar 1 700 skoliad divyezhek a-benn 2015 a c'hello bezañ tizhet ma talc'h ar vro gant ur c'hresk bloaziek keitat par da 6,8%, da lavaret eo war-dro 100 skoliad ouzhpenn er c'helenn divyezhek bep bloaz (50 skoliad ouzhpenn bep bloaz e oa ar sifr keitat tizhet e-pad ar prantad 1999-2008). Met ar pal-se n'halla bezañ tizhet nemet ma tigoror skolioù nevez bep bloaz er vro. Ar pezh a dalvez programmiñ ha kenurzhiañ gwelloc'h evit digeriñ lec'hioù nevez da respont d'ar goulenn sokial, evel e Tredraezh-Lokemo da skouer, kreñvaat lec'hioù a zo en o-unan evit ar mare, evit reiñ an tu da "voueta" an hentad en eil derez (evel e Plistin pe e Pempoull) ha krouiñ lec'hioù er c'humuniezhioù-kumunioù dibourvez. **Disheñvel eo emdroadur ar vro diouzh hini bro Brest hag a zeu a-benn da seveniñ ar palioù bet lakaet a-drugarez al lec'hioù nevez-krouet.**

Ar c'humunioù pe kumuniezhioù kumunioù a c'hall ober enklaskoù e-touez ar gerent evit prizañ ar goulenn.


➤ Stadegoù ar c'helenn divyezhek

Feur ar c'helenn divyezhek dre live e bro Treger-ha-Goueloù keñveriet gant hini bro Brest, gant hini departamant Aodoù-an-Arvor ha gant hini Breizh – Bloavezh-skol 2007/2008



Uheloc'h eo ar feur skoliata en hentad divyezhek evit ar c'hentañ derez e bro Treger-ha-Goueloù eget e departamant Aodoù-an-Arvor, e Breizh hag eget en holl vroioù all. Bro Treger-ha-Goueloù eo ar vro ma kaver **an dregantad uhelañ a skolidi divyezhek er boblañs skol a-bezh. Pouez ar c'helenn divyezhek zo kreñvoc'h e bro Treger-ha-Goueloù eget e bro Brest pe bro Kêr Wened da skouer. Splannoc'h eo pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez.**


Kalz uheloc'h eo an dregantad evit ar c'hentañ derez zoken : tost da 10% eus skolidi skolioù-mamm ar vro zo en un hentad divyezhek ha 7,7% eus ar c'hentañ derez a-bezh (eus ar skol-vamm d'ar CM2, roadennoù 2008/2009).



Bras eo pouez ar c'helenn divyezhek e kumunioù ar vro a zegemer skolioù divyezhek, muioc'h eget e lec'h all e Breizh. Enne, en ur gumun diwar ziv ez eo ar skolidi divyezhek ouzhpenn ur c'hard eus ar boblañs skol. Pa vez kroget gant un hentad divyezhek en ur gumun e tedenn an dud hag evel m'eo bihan kumunioù ar vro ma kelenner en div yezh e weler an disoc'h o tont buan : tizhet e vez buan un darn vat eus ar skolidi. Abaoe distro-skol 2007 ez eus ur gumun er vro m'emañ ar brasañ niver gant ar vrezhonegerien yaouank : e Plounevez-Moedeg.

En holl gumunioù eo aet war-raok feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez etre 1999 ha 2007. Gwall zizingal eo ar c'hresk avat. Ul lamm zo bet graet e Pempoull : eus 2,8% e 1999 e tremener da 10,8% e 2007 gant digoridigezh an hentad publik e 2000. Aet eo an divyezhegezh kalz war-raok er c'humunioù etre : Plistin, Kawan, Perwenan ha Tregastell ma'z eus etre ur c'hard hag un drederenn a skolidi divyezhek. Padal n'eo ket kresket pouez ar c'helenn divyezhek e Lannuon, pol pennañ ar vro. Stabil eo chomet an dregantad a skolidi divyezhek eno. Evit reiñ lusk en-dro d'ar c'helenn divyezhek e Lannuon e vo ret soñjal digeriñ un eil lec'h publik (evel m'eo bet graet e kumunioù par da Lannuon, evel e Lannarstêr pe e Landerne) ha digeriñ ur skol gatolik. Ezhomm zo da gelaouiñ muioc'h an dud ez eus skolioù divyezhek ha da vrudañ ar c'helenn divyezhek er c'humunioù bras. Aesoc'h e tremen ar c'heleier er c'humunioù bihan pa n'eus nemet ur skol er gumun.

⁴ An holl sifroù dre gumun a gaver er stagadennoù p 58.




Gant KK an Teir Stêr ha hini Kreiz Treger emañ ar feurioù uhelañ er vro. E-touez frammoù etrekumunel kentañ Breizh emaint evit feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez. E 1999 ne oa framm etrekumunel ebet en tu all da 10% nag er vro nage Breizh : tri anezho zo tremenet en tu all d'ar vevenn-se 10 vloaz war-lec'h (un 10 bennak e Breizh).

E-touez ar frammoù etrekumunel ma vez pouez ar c'helenn divyezhek en e greñvañ e Breizh emañ frammoù etrekumunel ar vro. Tolpad-kêrioù Lannuon-Treger eo ar gumuniezh en em gav er penn kentañ e-touez ar c'humuniezhioù pobletañ e-keñver feur ar skolidi divyezhek e poblañs skol ar c'hentañ derez : emañ e-touez an tri framm etrekumunel ma vez ar rouedad skolioù divyezhek en e stankañ gant Brest Meurgêr ar Mor ha Kumuniezh Tolpad-kêrioù an Oriant (ouzhpenn 6 lec'h er framm etrekumunel). N'eus nemet Kumuniezh-Kumunioù Pempoull-Goueloù zo izeloc'h he fouez ha pa vefe kresket kalz ar feur-se abaoe krouidigezh an hentad er c'helenn publik (ne oa nemet 1,5% eus skolidi ar gumuniezh-kumunioù skoliataet en un hentad divyezhek eno e 1999) : ar gumuniezh-kumunioù nemeti eo en em gav dindan keidenn ar vro (war-bouez an div gumuniezh-kumunioù dibourvez). Poblet a-walc'h eo ar gumuniezh-se e-keñver kumuniezhioù all ar vro ha n'eus nemet ur gumun er gumuniezh hag a ginnig un hentad divyezhek.

Diskouez a ra splann ar gartenn-mañ an digempouez zo etre kornôg ha reter ar vro. Eno eo kalz rouesoc'h ar c'hinnig divyezhegezh. Gant se eo bro Treger-ha-Goueloù unan eus ar broioù gant ar muiañ a zigempouez e Breizh peogwir e tremener, en ur ober un nebeud kilometroù, eus ar feurioù uhelañ zo e Breizh da netra ebet.

Emdroadur feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e frammoù etrekumunel eus 1999/2000 da 2007/2008



Tremen daougementet eo bet feur ar c'helenn divyezhek e bro Treger-ha-Goueloù etre 1999 ha 2007. Kresket-kalz eo en holl frammoù etrekumunel, splannoc'h eget e bro Brest da skouer, homañ ur vro m'eo diorroet ar muiañ ar rouedad skolioù divyezhek.

Pevarc'hementet eo bet feur ar skolidi divyezhek e poblañs skol K.K. Kreiz Treger, gant Kawan dreist-holl, al lec'h divyezhek nemetañ er gumuniezh-kumunioù. Tric'hementet eo bet e K.K Pempoull-Goueloù zoken war-lerc'h krouidigezh al lec'h publik, ha pa chomfe an dregantad dindan keidenn ar vro c'hoazh.

Gallout a ra ar c'helenn divyezhek cheñch buan tres ar boblañs skol er frammoù etrekumunel n'int ket poblet-stank, pa weler pegen buan eo kresket ar feur e K.K. Beg ar C'hra ma oa bet krouet al lec'h kentañ ha nemetañ e 2002 : ouzhpenn 10% eus skolidi ar boblañs skol zo bet tapet bremañ.

Kalonekaus eo evit krouiñ hentadoù divyezhek en div gumuniezh-kumunioù zo hep hini ebet evit ar mare hag a zo par o foblañs skol da hini K.K. Beg ar C'hra : K.K.Gourenez Lezardrev ha K.K. Bro ar Roc'h : ur raktres lec'h divyezhek zo deuet a-benn da zigeriñ e Gwengolo 2009 e Pleuzal, ur gumun stok ouzh kumuniezh-kumunioù Bro ar Roc'h.

Kelenn brezhoneg

➤ An tañva brezhoneg er c'hentañ derez


N'eo ket diorroet an doare kelenn-se er vro nag en departamant dre-vras. Departamant Aodoù-an-Arvor n'eus ket bet aozet gantañ un tañva yezh er skolioù evel zo bet graet e Penn-ar-Bed. Etre 8,1 ha 9,2% eus poblañs skolioù kentañ derez bro Brest a vez kizidikaet ouzh ar brezhoneg dre stignad departamant Penn-ar-Bed da skouer.

Evit ar skolidi n'int ket skoliataet en hentadoù divyezhek eo an tañva un doare da gaout un tamm darempred gant ar yezh koulskoude. Gallout a ra an tañva-se er c'hentañ derez skoazellañ ar c'hentelioù en eil derez, pa ro c'hoant d'ar vugale da genderc'hel gant ar yezh war-lerc'h. Ouzhpenn-se e laka war wel diagnostik bro Brest hag a denn splot eus politikerezh Kuzul-departamant Penn-ar-Bed n'eus ket kevezerezh etre ar c'hinnigoù. Respont a reont da ezhommoù disheñvel. El lec'hioù m'eo ar c'hreñvañ ar c'helenn divyezhek emañ an tañva en e greñvañ ivez⁵. Diskouez a ra an tuadur "seul vui seul c'hoazh" : seul vrasoc'h ar c'hinnig brezhoneg en ul lec'h bennak, seul vui eo dedennet ar Vretoned gant ar yezh.

➤ Ar c'helenn brezhoneg en eil derez

Kentelioù brezhoneg a vez kinniget en eil derez ivez. Er skolaj e c'hell bezañ graet dindan stumm abadennoù tañva adalek ar 6^{vet} betek an 3^e klas (etre un eurvezh ha div eurvezh bep sizhun, ma roer un tamm deskamant war yezh ha sevenadur Breizh). Er 4^e hag en 3^e klas e c'hall ar brezhoneg bezañ kinniget evel Yezh Vev pe evel danvez dibab : etre div ha teir eurvezh bep sizhun.

Dasparzh ha niver ar skolidi en eil derez – Bloavezh-skol 2008/2009



⁵ E bro Brest da skouer : e K.K. Plabenneg hag an Aberioù emañ feur an tañva en e uhelañ (17,2%), evel ma c'hoarvez evit ar c'helenn divyezhek (11,1%).


E bro Treger-ha-Goueloù e kinniger kentelioù brezhoneg en holl gumunioù dezho ur skol eil derez d'an nebeutañ, ar pezh ne dalvez ket e vefe tu da zeskiñ brezhoneg en holl skolaioù ha liseoù : kentelioù zo e 7 skolaioù diwar an 13 zo er vro hag e 3 lise diwar ar 6 zo er vro. An darn vrasañ eus ar c'hinnig a gaver er skolioù publik : 7 skol publik eil derez diwar 12 a ginnig kentelioù brezhoneg, pa n'eus nemet 3 skol brevez diwar 7 a ra kemend-all.

218 skoliad a heuilh kentelioù brezhoneg en eil derez e 2008/2009, da lavaret eo 2,9% eus holl skolidi eil derez ar vro.

Digempouez eo an dasparzh **etre ar skolaioù hag al liseoù**. Skolajidi eo a zesk ar yezh dreist-holl evel m'emañ kont dre-vras e lec'h all e Breizh : 88% eus skolidi eil derez ar vro a heuilh kentelioù brezhoneg zo skolajidi. Un tañva eus ar brezhoneg an hini a vez roet da 81% eus an dud yaouank a heuilh kentelioù brezhoneg er vro. Lec'hioù bras evel Pempoull, Perroz-Gireg pe Plistin a vod skolajidi a ginniger dezho un tañva eus ar brezhoneg da skouer. **Digempouez** eo an dasparzh **etre an hentadoù** ivez, brasoc'h eget ar pezh a weler e lec'h all e Breizh c'hoazh : tost an tri c'hard eus ar skolidi zo enskrivet en ur skol publik (e Breizh a-bezh, 61% eus an dud yaouank o deus kentelioù brezhoneg en eil derez zo enskrivet en ur skol publik). Ne ra nemet heuliañ dasparzh ar c'helenn hollek e gwirionez : an tri c'hard eus poblañs skol ar vro zo skoliataet er c'helenn publik.


Splann eo neuze e vefe danvez da vont war-raok gant ar c'hentelioù brezhoneg en eil derez ma vefe aozet gwelloc'h ar c'hinnig : an tañva a c'hellfe bezañ ledanaet da gizidikaat an dud yaouank, evel ma vez graet e skolaioù prevez Lokouran e bro Brest (divizet he deus ar skol kinnig un tañva eus ar brezhoneg d'an holl skolaioù er 6^{vet}). Pouezus eo e vefe doareoù aes evit ar c'hentelioù-se (eur, lec'h) hag e vefe kelaouet mat ar skolidi hag o zud. Ul labour kelaouiñ zo da gas da benn evit tizhout muioc'h a skolidi.

Emdroadur sifroù ar c'helenn brezhoneg en eil derez publik 2004 da 2008




Daoust d'an ehan en digresk er bloavezh-skol 2007/2008, e tiskouez sifroù ar c'helenn brezhoneg en eil derez er vro un tuadur d'an digresk, heñvel ouzh ar pezh a c'hoarvez e Breizh a-bezh ivez. Brasoc'h eo dregantad skolidi ar vro a heuilh kentelioù brezhoneg (2,9%) eget keidenn Breizh(1,3%) met chom a ra gwall izel feur ar skolidi a c'hall kaout kentelioù brezhoneg en eil derez c'hoazh.

Emdroadur an niver a skolidi en eil derez publik ha prevez



* sifroù rakwelet gant Akademiezh Roazhon

Emdroadur an niver a skolajidi ha liseidi



* sifroù rakwelet gant Akademiezh Roazhon

War zigreskiñ eo aet sifroù ar c’helenn brezhoneg en eil derez e-kerzh ar bloavezhioù tremenet. Hollek eo **an digresk**-se abaoe 2004 met splannoc’h eo er skolaj hag er c’helenn publik c’hoazh ha **brasoc’h er vro-mañ eget e Breizh a-bezh**. Tost daouhanteret eo bet an niver a skolidi brezhoneg a oa en eil derez e 2004, pa sav an digresk da 5% e Breizh. Un digresk a verzer en holl lec’hiennoù deskiñ eil derez ar vro.

An tuadurioù-se ne glotont ket gant re sifroù ar c'helenn divyezhek (kresk dalc'het e pep hentad). Tennañ a reont kentoc'h moarvat da aozioù diaes ha politikerezh ar Rektoriezh e-keñver an danvezioù dibab. N'eo ket aozet goulenn ar gevredigezh evit kaout ur c'helenn brezhonek ledan er vro.

Hervez divizoù ar Rektoriezh, ne emdroio ket ar c'hinnig war an tu mat e bro Treger-ha-Goueloù e gwirionez. Kinniget ez eus bet serriñ kentelioù danvez dibab er skolaj publik e Lannuon e distro-skol 2009 da lavaret eo **ne c'halla skolajiad ebet ken heuliañ kentelioù brezhoneg en ur skolaj publik e Lannuon, pa vez skoliataet 30% eus skolajidi ar vro eno koulskoude**. Mont a ra an dra-se a-du gant tuadurioù lakaet e plas gant ar Rektoriezh abaoe meur a vloaz. Evit stourm a-enep al lusk-se ez eus bet fellet da Rannvro Breizh kinnig ur skoaziad a 150 € dre lisead a zesk brezhoneg.

An deskadurezh uhel

E-touez skolioù uhel ar vro n'hon eus renablet nemet rann "Info—com" IUT Lannuon a glask aozañ traoù tro-dro d'ar brezhoneg. Abaoe 2002 e vez kinniget da studieren ar rann-se kentelioù "sevenadurezh Breizh" da zibab etre danvezioù yezh all. Tañva ar yezh eo an darn vrasañ eus ar c'hentelioù-se (un eurvezh hanter bep sizhun). 15 studier, dre-vras, a vez er c'hentelioù-se diwar 50 studier, daoust d'ar c'hevezerezh bras zo etre ar c'hentelioù-se hag ar c'hentelioù yezh all (ne c'hall ket ken ar studieren dibab an daou).

N'eus ket bet kendalc'het gant ar stajoù ur sizhunvezh a oa bet aozet e 2001 hag e 2002 war ar c'hazetennerzh e brezhoneg. E kenlabour gant France 3 Hirwazh ha TV Breizh e oa bet savet ar stummadur-se. Digor e oa ar staj da studieren an IUT ha d'ar studieren eus an diavaez. Daou remziad a 14 studier o doa gallet heuliañ ar stummadur-se, en ur dennañ splot eus binvioù arbennikaet ar skol. N'eo ket bet adaozet peogwir n'o deus ket embannet an danvez implijerien (TV Breizh pe France 3 Ouest) kaout ezhommoù implijoù war verr dermen. Koulskoude ez eus ezhommoù stummañ er vicher-se, evit stummañ kazetennerien da sevel pennadoù brezhonek e kazetennoù ar vro da skouer.


Ar c'helenn d'an oadourien

Dre ar c'hentelioù noz e vez desket ar yezh gant an dud deuet, er vro. N'eus nemet kentelioù noz e-touez al lec'hioù deskiñ er bloavezh 2008/2009. Framm ebet ne ginnig stajoù hir pe hiroc'h er vro. Plouha pe Plijidi eo al lec'hioù tostañ evit heuliañ stajoù hir evit ar mare.

Aozadur pennañ ar c'helenn dre lizher zo staliet er vro avat : e Lannuon emañ sez Skol-Ober. Stabil eo an niver a dud a zesk brezhoneg dre lizher : 315 den a oa enskrivet e kentelioù ar framm-se e 2008, da lavaret eo 90% eus an dud a heuilh kentelioù dre lizher. Met n'eo ket aozet ar c'hentelioù-se evit tud ar vro nemetken.

Bras eo levezon kevredad **al Levrig** er vro. Kinnig a ra ur servij kelennerien a vicher d'ar c'hevredigezhioù ; ar framm hag a vod ar muiañ a skolidi er vro eo ivez. **Kreizenn sevenadurel Lannuon** a ginnig ur c'hursus kentelioù abaoe pell e Lannuon.

War-dro 20 kelenner a gelenn brezhoneg d'an oadourien e bro Treger-ha-Goueloù. 4 c'helenn diwar bemp zo tud a-youl vat hag un drederenn eus ar gelennerien a-youl vat-se a vez digollet hepken. 3 c'helenn a vicher zo er vro.




Bro Treger-ha-Goueloù

Tennañ a ra ar gartenn-mañ tamm pe damm da hini ar c'helenn divyezhek. Kinnig a reer kentelioù brezhoneg en holl gumunioù enno ur skol divyezhek, war-bouez div gumun. Diskouez a ra ur c'hinnig diorroet gwelloc'h ha kempouesoc'h war dachenn ar vro memes tra. Dont a ra splann war wel n'eo ket Lannuon pol pennañ ar vro, pell a se ha kalz muioc'h a lañs zo gant Pempoull bremañ.

Kentelioù brezhoneg a zo e 13 kumun eus ar vro (daou lec'h deskiñ zo e kumun Pempoull zoken) ha tost holl annezidi ar vro a c'hell kavout ul lec'h deskiñ dindan 10 km eus o zi. Gant ar gevredigezh **Al Levrig** e vez meret pe harpet tremen an hanter eus al lec'hioù deskiñ-se (8 lec'h diwar 14). Stabil a-walc'h eo al lec'hioù deskiñ kinniget d'an dud e-keñver ar pezh a oa e 2004.

⁶ Ar sifroù-se a gaver dre ar munud er stagadennoù p 59.

Emdroadur an niver a dud deuet enskrivet er c'hentelioù noz etre 2003 ha 2008



N'eo ket c'hoarvezet er vro an digresk bras zo bet merzet gant an niver a skolidi e lec'h all e Breizh (daoust d'ar c'hresk zo bet en distro-skol diwezhañ n'eo ket bet adaptet live 2003 e Breizh) abalamour m'eo frammet gwelloc'h ar c'helenn er vro gant Al Levrig ha kevredigezhioù Pempoull peurgetket. Deuet eo ar vro a-benn da virout e "skolidi" tamm pe damm. Muioc'h a dud deuet a zesk brezhoneg e 2008 eget e 2003 er vro (ar pezh n'eo ket gwir e Breizh dre-vras). **263 oadour** zo enskrivet e kentelioù noz er bloavezh 2008/2009. Er vro-mañ eo diorroet ar muiañ ar c'helenn d'an dud deuet e-keñver broioù all an departamant. Poblans deskidi ar vro a ya d'ober an hanter eus holl deskidi Aodoù-an-Arvor pa'z a poblans ar vro d'ober 20 % eus poblans an departamant hepken.

O sellet ouzh ar sifroù dre gumun e verzer eo renket mat Pempoull : ar pevare kumun e Breizh ma vez an niverusañ an deskidi. Muioc'h a dud a zesk brezhoneg e Pempoull (79) eget e Sant-Brieg (55), Gwened (56), pe Kemper (71) pe e kumun bennañ ar vro zoken, Lannuon (52). Daou framm a ginnig kentelioù er gumun : ar greizenn Anjela Duval ha kreizenn sevenadurel vreizhek Pempoull Tan dezhi hag a zo oberiant war dachenn an obererezhioù kinniget d'ar skolidi e-maez ar c'hentelioù ivez.

An trede bro eo bro Treger-ha-Goueloù evit an dud deuet a zesk brezhoneg, goude bro Brest (623) ha bro Gerne (456), pa oa an 8^{vet} bro e 2004. Deuet eo ar vro a-benn da vont-war-raok pa'z eus bet merzet un digresk er broioù all e-kerzh ar prantad 2004-2008. Muioc'h a zeskidi zo er vro eget e bro an Oriant pe e hini Kêr-Wened da skouer. A-drugarez d'ar c'helenn a zo aet war vicherelaat er vro-mañ sur-a-walc'h, gant ar gevredigezh Al Levrig a ginnig ur servij kelennerien a-vicher d'ar c'hevredigezhioù all. Lañs zo gant ar c'hentelioù noz en distro-skol 2008. Splann eo bet kresk an niver a zeskidi er c'hentelioù noz en distro-skol-se. Splannoc'h eo eget an hini merzet e Breizh ha hini Aodoù-an-Arvor zoken (+15%), an hini brasañ e-touez an departamantoù koulskoude : +20% a skolidi e-keñver distro-skol 2007 er vro p'eo +6% e Breizh. Al liveoù uhelañ eo a gresk ar muiañ : daougementet eo bet an niver a skolidi el liveoù 4 hag uheloc'h e-keñver distro-skol 2007. Mat-tre eo bet distro-skol an deraouidi e lec'hioù brasañ ar vro ivez : un hanter a zeraouidi ouzhpenn zo e Pempoull ha daougementet eo bet an niver a zeraouidi e Lannuon.

Gant liveoù uhelañ ar c'helenn d'an oadourien e bro Treger-ha-Goueloù (liveoù 4 ha 5) e c'heller brasjediñ e vefe bet stummet e bro Treger-ha-Goueloù war-dro 75 brezhoneger deuet d'o oad e-doug ur bloavezh.

Klozadur ar brezhoneg en deskadurezh

E-touez ar broioù m'emañ ar c'helenn divyezhek en e uhelañ eo bro Treger-ha-Goueloù. Er pevare renk emañ ar vro evit poblañs ar skolidi divyezhek hag en trede evit poblañs an deskidi e-touez an dud deuet zoken, p'eo renket d'ar 7vet renk evit he foblañs dre vras. Dalc'het he deus he flas e-keñver 2004 evit ar c'helenn divyezhek ha deuet eo a-benn da dremen dirak broioù all evit an niver a dud deuet a zesk brezhoneg e-keñver 2004.

E penn a-raok ar broioù eo chomet ar vro e-keñver feur ar skolidi divyezhek e poblañs skol ar vro. E-bro Treger-ha-Goueloù emañ **ar brasañ dregantad a vugale skoliataet er c'helenn divyezhek**. Tost da **10 % eus bugale skolioù-mamm** ar vro zo skoliataet en hentadoù divyezhek. Diforc'hioù bras zo etre ar frammoù etrekumunel er vro koulskoude c'hoazh : tremen a reer eus feurioù uhelañ Breizh (e K.K an Teir Stêr ha hini Kreiz Treger da skouer) da 0% eus ar boblañs skol er c'helenn divyezhek (er gumuniezh-kumunioù tostañ, K.K Bro ar Roc'h da skouer).

N'eo ket emdroet kalz skeudenn ar vro abaoe 2004 koulskoude. Emdroadur an niver a skolidi n'emañ ket a-live gant hini Breizh : techet eo da c'horrekaat muioc'h eget keidenn Breizh. **N'eus bet digoret lec'h publik nevez ebet abaoe 2002**. Unan eus ar 6 bro ma c'heller kaout ur c'hendalc'h betek al lise eo ar vro met n'eo ket aet ar yezh war-raok en eil derez e-keñver 2004: chomet eo Lannuon al lec'h nemetañ er vro ma c'haller bezañ skoliataet eus ar skol-vamm d'al lise. Kreñvaet eo bet c'hoazh pol pennañ ar vro hag a vod an div drederenn eus poblañs ar skolidi divyezhek, er prantad 2003-2008 : an holl lec'hioù nevez-digoret zo bet e Kumuniezh Tolpad-Kêrioù Lannuon-Treger pe just e-kichen (lec'h Perroz-Gireg). Lannuon, lec'h istorel an hentad divyezhek ne zeu ket a-benn da zerc'hel e renk : tremenet eo eus renk kentañ Breizh e 1999 d'ar pempvet renk e 2008. N'eo ket bet diorroet ar c'hinnig e kêr Lannuon evel m'eo bet graet e kêrioù all dre zigeriñ lec'hioù nevez e skolioù all, pe gant hentadoù disheñvel. Evit adreiñ startijenn d'an divyezhegezh er skol e Lannuon e vo dav soñjal digeriñ un eil lec'h publik ha degemer an hentad katolik da glokaat ar c'hinnig. Evit ar mare n'eus kumun ebet er vro a zegemerfe an tri hentad. Digempouez eo ar vro c'hoazh e-keñver dasparzh al lec'hioù etre ar c'hornôg hag ar reter. N'eo ket bet kempouezet gant lec'hioù krouet e reter ar vro e-kerzh ar prantad 2004-2008.

Peadra da ziorren zo er vro. Ezhomm zo da grouiñ lec'hioù nevez tro-dro da lec'hioù hag a zo o-unan evit ar mare evel **Plistin, Pempoull** pe **Landreger**. Kreñvaet e vefe ar poloù-se gant lec'hioù nevez hag a zeufe da voueta an hentad en eil derez. Ezhomm zo da ziorren an eil derez evit ma vefe nebeutoc'h a skolidi o tilezel an hentad en eil derez abalamour d'an diouer a ginnig tost eus o lec'h annez hiziv an deiz. Ar muiañ-niver zo gant ar skolidi divyezhek e unan eus kumunioù ar vro, e Plounevez-Moedeg, evit ar wech kentañ abaoe pell.

E-maez eus ar c'helenn divyezhek, n'eus ket kalz a skolidi o devez tro da zeskiñ brezhoneg nag er c'hentañ nag en eil derez. Tañva ar brezhoneg ne vez ket graet e skolioù ar c'hentañ derez. Evit ar poent n'en deus ket diskouezet an departamant bezañ mennet da gizidikaat ar vugale ouzh ar brezhoneg, war skouer ar pezh a ra Kuzul-departamant Penn-ar-Bed. Pourvezet mat a-walc'h eo ar vro evit ar c'hentelioù brezhoneg en eil derez : un hanter eus skolioù an eil derez a ginnig kentelioù. Koulskoude eo bihan-kenañ feur ar skolidi a heuilh ar c'hentelioù-se abalamour da gudennoù aozañ, brudañ ha kehentiñ peurvuañ. Brasoc'h c'hoazh eo digresk an niver a skolidi er vro eget e Breizh.

Ar c'helenn d'an oadourien zo diorroet mat a-walc'h. Bras eo pouez ar vro en departamant evit se : an hanter eus deskidi an departamant zo er vro. Lañs zo gant ar c'hentelioù noz zoken : +20% a zeskiñ a oa bet en distro-skol 2008 e-keñver 2007. Splannoc'h eo al lañs-se er vro eget e Breizh hag en departamant zoken. N'eus ket bet a zigresk bras evel e Breizh kennebeut er prantad 2003-2008. War dachenn ar stummadur dibaouez ez eus ur mank bras er vro. N'eus stummadur hir ebet kinniget d'an dud deuet c'hoazh ha pa vefe ur raktres gant Stumdi hag Al Levrig a-benn 2010 e Kawan.

Pa reer bilañs an emdroadurioù e metoù ar c'helenn e bro Treger-ha-Goueloù abaoe an diagnostik kentañ (2004), eo splann eur aet muioc'h-mui war-zu ur c'helenn brezhoneg er skol bevennet d'ar c'helenn divyezhek hepken. An tuadur-se a laka er-maez an holl re n'o deus ket bet ar soñj pe n'int ket bet kelaouet abred a-walc'h da gregiñ gant un hentad divyezhek.

Un touell e vefe lakaat dazont ar yezh penn-da-benn war chouk ar skolidi divyezhek. Pep rummad oad en deus e lod da ober. **Evit ma c'hellfe ar yezh adsevel he c'hein e bro Treger-ha-Goueloù e rankfe war-dro 750 brezhoneger ampart ouzhpenn bezañ stummet bep bloaz gant an holl zoareoù kelenn**. Sur eo ne dizher ket ar sifr-se daoust ma n'eo ket aes da jediñ (peseurt lodenn eus ar skolidi divyezhek a chomo brezhonegerien oberiant?). Da dizhout ar pal-se e vank ur politikerezh kenurzhiet sammet a-gevret gant an ensavadurioù barrek, dezhañ palioù bihan met uhel ha kempoell evit dazont ar yezh e bro Treger-ha-Goueloù.

Preder ar bed foran

Oberourien ar politikerezh yezh er vro

Atebegezh meur a strollegezh tiriadel eo merañ politikerezh yezh bro Treger-ha-Goueloù. Da lavaret eo emañ ar barregezhioù evit kas ur politikerezh yezh da benn en tiriad e dalc'h meur a strollegezh tiriadel. Bras eo barregezhioù ar strollegezhioù tiriadel lec'hel (Rannvro, Departamant, DFKE⁷, kumunioù) a-drugarez da bennaenn ar frankiz d'en em verañ zo gant ar strollegezhioù tiriadel (“principe de libre administration des collectivités territoriales”).

- Da gentañ penn, **ar Stad** a ver an hentoù broadel da skouer (n'eus nemet div gumun eus ar vro zo treuzet gant un hent broadel, an RN 12 : Plounevez-Moedeg ha Plounerin) hag an holl servijoù melestradurel (endro, sevenadur, aferioù yec'hedel ha sokial, h.a.).
- **Rannvro Breizh** zo karget da sevel ha kempenn al liseoù. Roet he doa lañs, e 2004, d'ur politikerezh tiriadel diazezet war ar broioù. Sinet ez eus bet kevratoù bro a-benn steuñvekaat politikerezhioù ar rannvro dre diriad.
- **Departamant Aodoù-an-Arvor** a ver an hentoù departamant, frammoù foran sevenadurel pe c'hoazh takadoù naturel evel Karreg al Laer e Perwenan pe Roc'h an Evned e Plaeranez. Ledan eo atebegzhioù ar strollegezh tiriadel-se en obererezh sokial evit an dud oadet da skouer pe evit ar vugale.
- **An etrekumunelezh** : war ledanaat ez a tachenn galloudoù an etrekumunelezh. Bras eo pouez ha galloud Tolpad-kêrioù Lannuon-Treger da skouer e pep keñver (ar boblañs dre-vas, an armerzh, an aveadurioù sevenadurel, ar skolioù,...). Merañ a ra ar c'houronklec'h c'hoari « Ti Dour » pe ar sal abadennoù « Karrez hud » abaoe Genver 2005.
- **Ar c'humunioù** : ledan eo barregezhioù ha galloudoù ar c'humunioù evit merañ o ziriad. **Ar c'humunioù eo ar strollegezhioù tiriadel zo aet ar pellañ evit lakaat ur politikerezh yezh da dalvezout e bro Treger-ha-Goueloù.**

Gallout a ra pep strollegezh foran ober gant ar brezhoneg er vuhez foran. Gant al lezenn e vezer rediet da implijout ar galleg met implijout ur yezh all n'emañ ket e-maez lezenn : aotreet eo implij ar yezhoù rannvro e-kichen ar galleg er vuhez foran. Kreñvaet eo bet an dielfennadur-se eus an testennoù gant ar Vonreizh kemmet e miz Gouere 2008. Degemeret ez eus bet ur mellad gant ar Parlamant hag a anavez ar yezhoù rannvro : “Mellad 75-1. - *Ul lodenn eus glad Frañs eo ar yezhoù rannvroel* ». Gallout a ra pep strollegezh, diouzh he live, ober muioc'h gant he barregezhioù. An holl strollegezhioù ne dennont ket splot eus ar galloud-se evit kas ur politikerezh yezh da benn.

⁷ diazevadur foran a genlabour etrekumunel

Politikerezh yezh an departamant

Penaos e vez kemeret ar brezhoneg e kont gant an departamant

War an hentoù departamant da gentañ emañ ar brezhoneg er gweledva yezhel meret gant an departamant.

Pennadoù skrid e brezhoneg a gaver bep tro er c'hannadig miziek abaoe miz Gwengolo 2006. Savet int gant ur gazetennerez dizalc'h. Mont a ra danvez ar pennadoù en tu all d'ar glad : pennadoù a denn d'ar sport, d'an dudi, d'an armerzh eo, ar pezh a zo pouezus evit ar yezh. Paneve kazetenn an departamant ne vije tamm brezhoneg ebet war skoroù-kehentiñ an departamant. Unyezhek-rik eo lec'hienn Genrouedad an departamant, da skouer. Perzh a gemer Armor TV evit produiñ abadennoù Web noz avat (un abadenñ vrezhonek bep miz). Unyezhek eo al lec'hienn nevez-digoret gant ar c'huzul-departamant, Wikiarmor, da skouer.

E-maez hentoù kornôg an departamant e chom dister plas ar yezh alies. Skoazellañ ha heuliañ obererezh ar bed kevredigezhel eo a vez graet gant an departamant dreist-holl. Ne laka ket oberoù a denn d'ar yezh da dalvezout evel ma ra departamant Penn-ar-Bed. N'eo ket bet heuliet skouer departamant Penn-ar-Bed war dachenn an tañva er skolioù, lakaomp.

War dachenn implij ar yezh ez eus oberoù aes a c'hallfe bezañ lakaet e pleustr gant an departamant : degemer e brezhoneg, paperennoù talbennet divyezhek (lizheroù, goloioù-lizher, sielloù...), skridoù melestradurel divyezhek, lakaat an div yezh war dafar ha war kirri an departamant hag er c'hehentiñ dre-vras (skritelloù brudañ a bep seurt, pedadennoù, kartennoù-bizit, ...).


Kroget en deus an departamant da sevel tiez departamant a-benn tostaat e obererezh d'an annezidi. An hini kentañ zo bet digoret e Gwengamp. Met estreget ur meneg bihan "Ti an departamant" n'eo ket divyezhek ar panneloù nag en diavaez nag en diabarzh Digoret e vo an eil e Lannuon. Un digarez evit soñjal en divyezhegezh adalek ar penn-kentañ. Fellout a ra d'an departamant krouiñ unan e pep bro. Diwar atiz rener al levraoueg e kaver brezhoneg e panellerezh levraoueg an departamant e Plerin, war ar c'hirri, war ar paper lizher hag ar goloioù. Met n'eus tamm brezhoneg ebet e burevioù nevez ar C'huzul-departamant e Sant-Brieg, digoret e 2008, e Zoo nevez Tregonveur pe e savadurioù bras an departamant (Kastell ar Roc'h Ugu, da skouer). Digoret ez eus bet ur skourr brezhonek eus Levraoueg Aodoù-an-Arvor e Kawan e miz Meurzh 2009 (roet e oa bet lañs d'ar raktres-se adalek 2007). Gouestlet eo levraoueg Kawan d'al levrioù brezhonek ha da zielloù ar skrivagnerien vrezhonek. Tutaet ez eus bet **ul levraouegerez vrezhonegerez** gant an departamant evit merañ ar skourr-se.

Tachennoù nevez a c'hall bezañ digoret d'ar brezhoneg gant an departamantoù : tu a vefe da renabliñ an implijidi eus an departamant zo brezhonegerien ha kinnig ur stummadur d'ar re a fell dezho gallout degemer an dud e brezhoneg. Abaoe tri bloaz e kinnig renerezh ar c'hoskor kentelioù brezhoneg da implijidi an departamant. Heuliet eo ar c'hentelioù-se gant 15 den er bloavezh 2008/2009. N'eo ket aozet ar c'hentelioù-se war an amzer labour evel ma ra Kuzul-rannvro Breizh evit e implijidi abaoe miz Du 2008.

Ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg gant an departamant

Ur font “skoazell d'ar sevenadur brezhonek ha gallaouek”, staget ouzh budjed ar sevenadur, a vod oberoù Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor a denn d'ar yezh. Estreget ar brezhoneg a vez skoazellet gant ar font-se : sonerezh Breizh, dañsoù Breizh, festivalioù, h.a. An div drederenn eus ar font-se a ya da skoazellañ oberoù a denn d'ar brezhoneg war-eeun memes tra. Budjed bloaziek keitat Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor gouestlet d'ar brezhoneg a sav da 275 000 euro bennak. Ar sammad-se a gemm a vloaz da vloaz diouzh dasparzh ar font gant kengor-pad ar C'huzul-departamant.


Dispignoù bloaziek gouestlet d'ar yezh gant an departamantoù en €-Budjed 2008



Peder gwezh izeloc'h eget e Penn-ar-Bed eo ar budjed dre annezad gouestlet d'ar brezhoneg en Aodoù-an-Arvor : 0,61 € dre annezad. Bihan eo ar budjed gouestlet d'ar yezh gant an departamant dre vrezhoneger ivez, e-keñver an departamantoù all : Aodoù-an-Arvor eo an departamant a ouestl d'ar brezhoneg ar budjed izelañ dre yezher e Breizh.

War dachenn ar c'heleenn, estreget lodenn Diwan, e vez skoazellet dreist-holl an embann dafar gant Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor dre an aozadur TES staliet e Sant-Brieg. Stabil-kenañ eo ar sammad roet da dTES avat. Ur perzh bihan a gemer an departamant e stummadur ar gelennerien en ur arc'hantaouiñ yalc'hadoù an danvez kelennerien.

Emdroadur dispignoù departamant Aodoù-an-Arvor evit ar brezhoneg (e €) eus 2002 da 2008



Ur c'hresk zo bet en dispignoù gouestlet d'ar brezhoneg gant departamant Aodoù-an-Arvor, koulz evit an oberoù a-denn d'ar c'helenn hag an oberoù er-maez eus ar c'helenn etre 2002 ha 2008. Brasoc'h eo ar c'hresk evit ar c'helenn, p'eo bet daougementet an dispignoù. Klotañ a ra gant kresk an niver a skolidi a zesk brezhonek en departamant. Lieskementet eo bet an dispignoù er-maez eus ar c'helenn dre 1,5 er memes koulz.

Gant oberoù a denn d'ar c'helenn ez a an tri c'hard eus budjed an departamant gouestlet d'ar brezhoneg. Aet eo pouez ar c'helenn war greñvaat er budjed e-keñver ar pezh a oa e 2004, pa oa an div drederenn eus budjed ar brezhoneg gouestlet da bed ar c'helenn. An ober pennañ skoazellet gant an departamant eo ar skolioù dre soubidigezh : an tri c'hard eus ar budjed gouestlet d'ar c'helenn a ya da Ziwan (div drederenn da Ziwan Breizh hag un drederenn da skolaj Plijidi). Digresk bras zo bet war dachenn ar stummañ kelennerien : kalz nebeutoc'h a yalc'hadoù a oa bet dasparzhet e 2008 eget na oa bet graet e 2002 (rannet eo bet an dispignoù-se dre 4). Abaoe 2004 n'eo ket uheloc'h yalc'had ar studierien a vez stummet evit dont da vezañ kelenner divyezhek eget yalc'hadoù ar studierien all, da lavaret eo n'eo ket broudet ken an danvez kelennerien da zibab ar brezhoneg. Meret e oa ar yalc'hadoù-se gant renerezh ar sevenadur betek 2009. Gant ar servij deskadurezh e vezont meret hiviziken. Mont a ra politikerezh Aodoù-an-Arvor a-enep diviz ar Rannvro he doa roet lañs d'ur stignad yalc'hadoù evit an danvez kelennerien e Meurzh 2009, kenkoulz hag a-enep an ezhomm bras da stummañ kelennerien a weler e Breizh dre-vas.

N'eo ket bet ken uhel kresk an dispignoù evit an oberoù er-maez eus ar c'helenn : +45% etre 2002 ha 2008 memes tra a-drugarez d'ar skoazell roet d'an departamant evit krouiñ Ti ar Vro Treger-ha-Goueloù staliet e Kawan abaoe fin 2005. Kresket eo bet un disterañ ar budjed roet d'ar skingomz un tamm (daoust m'eo chomet stabil ar skoazell roet da RKB) dre skoaziadennoù krouet evit Stalig ha "Brudañ ha skignañ" evit ar raktres keleier boutin d'ar skingomzoù a gemer perzh er rouedad (Arvorig FM, Radio Kerne, RKB ha RBG).

Digresket eo bet an dispignoù roet d'an embann (-36%), da lavaret eo e veze roet skoaziadennoù da diez-embann staliet er maez eus an departamant (da Emgleo Breiz pe da Geit

Vimp bev da skouer). **Abae 2005 en deus divizet an departamant paouez da skoazellañ an aozadurioù na labouront ket war dachenn an departamant war-eeun.**

Gwelet a reer pazennoù en emdroadur ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg : unan e 2004 pa oa bet kresket kalz ar skoaziadennoù da Ziwan ha pa oa bet krouet ur rann gouestlet d'an teknologiezhioù nevez (ur skoaziadenn d'ar gevredigezh STUR ent resis). Tizhet e oa bet ur bazenn all e 2007, gant kresk Diwan c'hoazh ha gant ur stignad en deus talvezet da aozadurioù bed ar brezhoneg : ar skoaziadennoù evit ar postoù labour kevredigezhel. Postoù labour zo bet skoazellet gant an departamant evit OAB, al Levrig, Stur ha Studi-ha-Dudi. Bihan eo al lodenn eus budjed ar c'helenn zo gouestlet d'ar c'helenn d'an oadourien (6%). Kresket e oa er prantad 2002-2008 memes tra (+40%). An div drederenn eus dispignoù an departamant gouestlet d'ar c'helenn evit an dud deuet a ya da aozadurioù eus bro Treger-ha-Goueloù. Gallout a rafe an departamant lakaat e pleustr ur stignad skoaziadennoù d'ar c'helenn d'an dud deuet, war skouer an hini zo evit ar skolioù sonerezh hag a resev un treziad dre eurvezh kelenn.

N'eus programm ebet gant Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor evel ar pezh a vez kaset da benn gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed evit kizidikaat ar vugale ouzh ar brezhoneg dre an tañva er skolioù⁸ pe ar stignad evit diorren an embann ha ledanaat ar c'hinnig levrioù evit ar re yaouank (Priz ar Yaouankiz). N'eus ket a bolitikerezh evit broudañ ar strollegezhioù lec'hel all da gemer ar yezh e kont er vuhez foran dre ur programm skoazell d'ar c'humunioù ha d'ar frammoù etrekumunel evit kas da benn studiadennoù war an anvioù-lec'h hag evit staliañ ur panellerezh divyezhek.

⁸ arc'hantaouiñ a ra departamant Penn-ar-Bed an hanter eus koust an tañva a vez kinniget er skolioù kentañ derez.

Stad an divyezhegezh er panellerezh-hent

Aodoù-an-Arvor e oa bet an departamant kentañ o tivizout staliañ panneloù divyezhek war an hentoù meret gantañ e 1984. Da gantañ e oa bet staliet panneloù mont-tre ha mont er-maez eus ar c'humunioù. **War hentoù kornôg an departamant hepken** e oa bet divizet implij an divyezhegezh d'ar mare-se, ar pezh n'en deus ket divizet departamant ar Mor-Bihan ober⁹. Adalek 1986 e oa bet divizet lakaat panneloù heñchañ. Kenderc'hel a ra an departamant da staliañ ur panellerezh heñchañ divyezhek pa vez digoret tammoù hent nevez pe pa vez erlec'hiet panneloù kozh. Mankoù a weler memes tra pa ne vez ket troet an holl venegoù a-wechoù, da skouer. Bro Treger-ha-Goueloù zo en tiriad ma vez staliet panneloù gant an departamant. Brasjediñ a ra renerezh hentoù an departamant ez eus 80% eus tiriad kornôg an departamant zo aveet gant panneloù divyezhek hiziv an deiz. Gwelet-mat e vez war hentoù ar vro neuze pa ouzer ouzhpenn-se ez a an hentoù departamant d'ober an darn vrasañ eus rouedad hentoù ar vro.

Staliet ez eus panneloù brezhonek ivez gant servijoù an endro e takadoù natur zo da skouer, niverus er vro. Met n'eus ket bet lakaet bep tro : n'eus panell brezhonek ebet e koadoù departamant Avaogour nag e Koad Meur Lanrodeg da skouer. Ha pa vefe bet an departamant kentañ o kemer an diviz, an departamant en deus kollet e lañs war dachenn ar panellerezh-hent. Tremenet eo Penn-ar-Bed dirazañ p'eo deuet da vezañ an departamant ma weler ar muiañ a vrezhoneg. Gant ur stumm orin brezhonek emañ tost holl gumunioù an departamant, neuze mat e vefe d'ar c'huzul-departamant astenn ar panellerezh er reter (kregiñ gant bro Sant-Brieg da skouer) hag o vont war zu ur sistemategezh evel ober gant ar brezhoneg evit ar panellerezh berrbad (ar re velen) pe panneloù nevez en implij evel al leurioù-kenweturañ da skouer (hag a vez gwelet e rouedad Penn-ar-Bed).

Estreget an departamant a gemer divizoù a-du gant ar brezhoneg evit ar panellerezh er vro : niverus eo ar strollegezhioù lec'hel oberiant war dachenn ar panellerezh. Strollegezhioù oberiantañ Aodoù-an-Arvor a gaver er vro. Dizingal eo an doare da ginnig an div yezh eus un eil strollegezh d'eben avat : ne vez ket heuliet bewech an erbedadennoù da sevel ur panellerezh divyezhek kempouez hag a galite evel a gaver e broioù all en Europa (Kembre pe Spagn da skouer). Mankout a ra standardoù boutin d'an holl strollegezhioù ha d'al liveoù disheñvel (kumun, DFKE, bro, departamant).

Gwelet a reer brezhoneg er vro a-drugarez d'ar Vro Douristel ivez : staliet e vez er c'humunioù panneloù glad diwar atiz bro douristel Treger-ha-Goueloù.

Donaet eo bet al labour war dachenn ar panellerezh divyezhek er vro abaoe 2004 c'hoazh. Estreget war ar panneloù-heñchañ niverusoc'h-niverusañ eo krog an divyezhegezh d'en em ledañ war tachennoù all: muioc'h-mui a blakennoù-straed hag a banelloù divyezhek er savadurioù-kêr a weler er vro, e kumunioù Lannuon, Plistin pe e kumunioù bihanoc'h evel Plouilio, Tregrom pe Kawan da skouer. Poloù nevez a-du gant ar yezh a zeu war wel e Bro-Oueloù ivez gant Ploueg-ar-Mor pe Pempoull da skouer, o doa sinet nevez zo ar garta Ya d'ar brezhoneg. (s.o. lodenn Karta Ya d'ar brezhoneg p 37).

⁹ Divizet en doa staliañ ur panellerezh-heñchañ divyezhek war e rouedad hentoù a-bezh e 2004.

Kevrat bro Treger-ha-Goueloù

Kevratoù bro liesvloaziek (evit ar marevezh 2006-2012) zo bet sinet gant ar broioù ha Rannvro Breizh e 2006. Ganto e vez steuñvekaet politikerezhioù ar Rannvro hervez an tiriad. Tri goload a ya d'ober ar C'hevratoù bro. Ar goload kentañ a denn da raktresoù ar Rannvro e tiriad ar broioù ; n'emañ ket e stern ar gevrat evit gwir. An eil goload («frammadurezh rannvroel/lec'hel») a denn da raktresoù kendivizet etre ar Rannvro hag ar broioù ; danvez ar C'hevratoù eo.

N'eo ket bet lakaet ar Chanter 9, da lavaret eo an hini a glot gant ar politikerezh yezh bet degemeret a-unvouezh gant Bodadenn rannvroel Breizh e 2004, en a-raok gant ar Rannvro. N'eo ket bet adkemeret ar Chanter 9 e kevrat bro Treger-ha-Goueloù da vat. N'eus nemet Bro Gerne he deus miret ar chanter 9 e-touez an ahelioù labour kinniget gant ar Rannvro. **Meneget eo an divyezhegezh er gevrat** sinet etre ar C'huzul-rannvro ha bro Treger-ha-Goueloù e Kerzu 2006, memes tra, e-touez an eil goload : raktresoù a denn da ziorren ar skolioù divyezhek kinniget. Raktreset eo er gevrat astenn ar strollad skolioù e Tregastell gant ar soñj kreñvaat an hentad divyezhek. Ur raktres da grouiñ ur c'hlas divyezhek e Tregrom zo bet enskrivet er gevrat a-benn kreñvaat ha saveteiñ ar skol er gumun vihan-se ivez . En **he C'harta bro** ez embanne ar vro **bezañ a-du gant diorren ar yezh dre vrudañ an divyezhegezh** war ar panneloù hag er c'hehentiñ c'hoazh e miz Gwengolo 2001. Emañ he lec'hienn Genrouedad, end-eeun, gant pajennoù brezhonek, unan eus binvioù kehentiñ ar vro.

E kerzh 2009 e vo adwelet ar c'hevratoù. Tu a vo neuze da ouzhpennañ raktresoù en ur implij peurgasket an trede goload («frammadurezh lec'hel») a denn da raktresoù n'int ket termenet en a-raok er c'hevratoù. Bez' ez eo an hent kinniget gant ar C'huzul-rannvro evit ma harpe raktresoù lec'hel a denn d'ar brezhoneg (staliañ panneloù-heñchañ divyezhek, sevel klasoù pe skolioù divyezhek, h.a.). Prezidanted broioù Breizh a oa bet kelaouet eus an dra-se dre ul lizher gant Prezidant ar Rannvro e deroù 2008. N'eus ket bet kaset raktresoù a denn da implij ar brezhoneg er vuhez foran da benn dre an trede goload-se c'hoazh er vro. Dre ar programm Leader + (prantad 2002-2008) eo bet arc'hantaouet Ti ar Vro e Kawan avat. Dibabet eo bet ar vro evit ar programm Leader 2007-2013 : raktresoù a denn d'an armerzh, d'an endro, d'al labour-douar a vo arc'hantaouet kentoc'h eget raktresoù sevenadurel.

Oberoù ar strollegezhioù lec'hel

Gant barrezhioù ar c'humunioù ez eus a bep seurt doareoù da implijout ar yezh.

Muioc'h-mui a gumunioù a gemer ar yezh e kont en o folitikerezh. Kalz muioc'h eget e 2004 e vez lakaet ganto ar brezhoneg war wel er panneloù pe er c'hehentiñ. N'eo ket ar politikerezh yezh un ahel politikel treuz c'hoazh, da lavaret eo ouzhpenn ar programm gouestlet d'ar brezhoneg ent resis n'eo ket lakaet ar politikerezh-se da dalvezout e rannoù all eus ar politikerezhioù-kêr. Ti-kêr Lannuon zo ur skouer vat eus ar pezh a c'hoarvez er vro. Aet eo an ti-kêr kalz war-raok evit ar panneloù. Ul labour a-feson a vez kaset da benn. Met ma vez meret raktres ur savadur gant servij ar sportoù da skouer n'eo ket sur e vo divyezhek. **Ret eo d'ar brezhoneg dont da vezañ un elfenn dreuz eus ar politikerezhioù.**

Skouerioù a-zoare zo er vro eus ar pezh a c'hall ober kumunioù bihan, nebeut a arc'hant ganto da lakaat ar brezhoneg e-kreiz ar vuhez foran : Pouldouran, Tregrom ha Plouilio, da skouer, a zo divyezhek o flakennoù-straed divyezhek ha panneloù diavaez an ti-

kêr. Plouilio zo aet pelloc'h c'hoazh gant ar responder, ar paper talbennet, ar pedadennoù, pennad-stur ar c'hannadig hag e logo zo divyezhek-holl.

Aet eur war-raok er vro abaoe 2004 war dachenn an anvioù-lec'h. Teir studiadenn war an anvioù-lec'h savet gant an Ofis zo bet degemeret gant ar c'huzulioù-kêr : gant Prad, Plounerin ha Tredraezh-Lokemo. Kemeret e vez e kont hiviziken evit reizhañ skritur an anvioù-lec'h pa vez nevesaet panelloù.

Talvoudus eo ar c'henlabour etre daou framm a gas ar brezhoneg war-raok er vro : **Al Levrig hag Ofis ar Brezhoneg**. Broudet hag aliet e vez ar strollegezhioù tiriadel d'ober gant ar yezh er vuhez foran gant kenlabour an daou aozadur-se. Kalz a banelloù divyezhek zo bet staliet a-drugarez labour bodad brezhonekaat Al Levrig e Tregastell, Plistin, Lannuon pe Blouilio da skouer. Deuet eo an Ofis da greñvaat ober Al Levrig gant ar garta Ya d'ar brezhoneg ha gant e varregezhioù war implij ar brezhoneg er vuhez foran, muioc'h c'hoazh abaoe ma z'eus bet krouet ul lec'h er vro gant un den karget eus an diorren.

Kregiñ a reer da brederiañ er frammoù etrekumunel evit kas ur politikerezh yezh da benn e Breizh hag er vro. Enni ez eus unan eus an tri DFKE o deus sinet ar garta Ya d'ar brezhoneg : K.K Kreiz Treger an hini eo, hag a vod kumunioù bihan (n'eus ket 6 500 annezad en holl er gumuniezh). Emañ ar gumuniezh-se o paouez kaout ul label abalamour d'al labour a-feson kaset da benn ganti. Ober a ra gant ar brezhoneg evit ar binvioù kehentiñ ensavadurel da skouer (logo, paperoù-talbennet ha pennad-stur divyezhek). Lakaat a ra ar brezhoneg war wel dre he fanellerezh diabarzh ha diavaez ivez. Degas a ra ur skoazell arc'hant evit kas en-dro ur vagouri a ra gant ar brezhoneg staliet e Bear ivez. DFKE pennañ ar vro, Tolpad-kêrioù Lannuon Treger, a grog d'ober gant ar brezhoneg ivez ha pa vefe en un doare arouezel c'hoazh. Lakaat a ra ar brezhoneg war wel dre e logo, e gelaouenn ("Mon aggro") hag ivez e panellerezh diabarzh e sez. Staliet ez eus bet panelloù divyezhek war-hed unan eus linennoù bus rouedad an tolpad-kêrioù (hini Lannuon-Montroulez). Moullet ez eus bet ur skritell divyezhek evit diveskañ al lastez ivez. N'eo ket bet sinet Ya d'ar brezhoneg ha n'eus ket bet staliet ur politikerezh yezh hollek en tolpad-kêrioù evel e Kreiz Treger c'hoazh.

Arouezel e chom implij ar brezhoneg e bed an touristerezh. N'eo ket deuet ar brezhoneg da vezañ un elfenn eus politikerezh kehentiñ tiez an douristed c'hoazh. Koulskoude e c'hallfe desachañ tud da Vreizh, dre lakaat war wel an dibarder-se eus ar vro ha degas plijadur d'an dud oc'h en em santout en ur vro disheñvel pa veajont. Met, start eo mont war-raok evit implij ar brezhoneg er bed-se. Traoù dedennus zo gant ar Vro Douristel koulskoude. Arc'hantaouiñ a ra ar panelloù glad e brezhoneg a gaver e kumunioù ar vro. Lakaat a ra enlinenn un tañva eus ar brezhoneg evit an douristed dre ur c'henlabour gant Al Levrig ivez.

Chom a ra strollegezhioù foran n'int ket kizidikaet ouzh ar brezhoneg c'hoazh. War an aod, kumunioù evel Perroz-Gireg pe Pleuveur-Bodoù, an div gumun nemeto a-vent-se n'o deus ket sinet ar garta Ya d'ar brezhoneg er vro, o deus tapet dale e-keñver ar c'humunioù nes. Ur skol divyezhek zo bet digoret e Perroz-Gireg e 2007 koulskoude ha kentelioù brezhoneg d'an dud deuet zo eno abaoe pell. Pe e kornioù-bro evel Landreger pe Gourenez Lezardrev, an DFKE nemetañ hep siner da Ya d'ar brezhoneg da skouer, ha n'o deus ket pledet gant ar brezhoneg c'hoazh.

Kizidikaat ar wazourien

Evit kas da benn ur politikerezh yezh diazezet war un diviz politikel ez eus ezhomm stummañ gwazourien. Abadennoù stummañ a vez aozet ingal gant an Ofis e skourr rannvroel ar CNFPT e Gwened da skouer abaoe 2003, un dra dibar e Frañs. Ur perzh oberiant a gemer Ofis ar Brezhoneg eno Fiziet ez eus en Ofis ober ur staj klok daou zevezh diwar-benn an doareoù da verañ an divyezhegezh en un tiriad. Dalc’het e vez e miz Here abaoe 2006.


En dalc’h kentañ o doa kemeret perzh daou gargiad eus ti-kêr Lannuon (ur skridaozer hag un den karget eus ar c’hehentiñ. Evit an eil dalc’h, e 2007, e oa bet kemeret perzh gant daou gargiad : unan eus Plouared (karget eus al levraoueg) hag unan kaset gant ti-kêr Plouilio. Kemeret ez eus bet perzh gant un teknikour eus servij hentoù departamant Aodoù-an-Arvor ivez.

Heuliet e oa bet stajoù ar CNFPT gant kentelioù kizidikaat ouzh ar brezhoneg (stajoù “les fondamentaux de la culture bretonne” pe “mise en oeuvre des politiques culturelles”) gant 4 c’hargiad eus bro Treger-ha-Goueloù e 2006 hag e 2007 (eus levraoueg Plouared, ti-kêr Plistin, Plouilio ha Lannuon).

Ya d’ar brezhoneg

Broudañ oberourien ar vuhez sokial hag armerzhel d’ober traoù fetis evit ar yezh eo pal ar c’houlzad *Ya d’ar brezhoneg*. Roet e oa bet lañs dezhañ e 2001. Divizet e oa bet ober kemend-all gant ar c’humunioù e 2004, dre m’int elfennoù diazez ar vuhez foran, ha gant ar frammoù etrekumunel e 2006. Er pleustr e vez kinniget d’ar pennadurezhioù-kêr dibab en ur roll 40 ober ar re a vo sammet ganto. Diouzh emouestl ar gumun, diouzh an niver a oberoù asantet ganti ha goude ma vo bet gwiriet eo bet kaset da benn ar pezh a oa bet prometet ober e roer unan eus ar pevar live testeniekaat a ya d’ober ar c’houlzad-se. **Diazez ar politikerezhioù yezh lec’hel a fell da *Ya d’ar brezhoneg* bezañ e gwirionez.**

Sinerien Ya d’ar brezhoneg er c’humunioù–Meurzh 2009



E miz Meurzh 2009 e konted 21 gumun o doa votet a-du gant ar garta *Ya d’ar brezhoneg*. Ur siner diwar 5 zo e bro Treger-ha-Goueloù ha 5 kuzul-kêr o deus dibabet al live 3 pa’z int 7 e Breizh a-bezh. Er c’humunioù-se ez eus **46% eus annezidi ar vro. Bro Treger-ha-Goueloù eo ar vro m’emañ en e uhelañ feur ar**

sinerien e-touez ar c'humunioù: un drederenn eus ar c'humunioù he deus degemeret ar garta (uheloc'h eget bro Brest (20% eus kumunioù ar vro o deus sinet) ha bro Gerne (22%)). Merzout a reer n'eus nemet ur gumuniezh kumunioù hep siner ebet : hini Gourenez Lezardrev, unan eus an div gumuniezh hep skol divyezhek ebet ivez.

Niverus hag oberiant eo ar sinerien e bro Treger-ha-Goueloù. A-live gant bro Gerne hag a-raok bro Brest emañ ar vro e-keñver an niver a sinerien. Lañs zo gant ar vro e-keñver an niver a labelioù roet d'ar sinerien. Un drederenn anezho zo bet labelaet da lavaret eo o deus sevenet an oberoù o doa embannet ober. K.K. Kreiz Treger eo ar gumuniezh kentañ e Breizh bet labelaet ivez. Degemeret eo bet ar garta gant holl gumunioù ar gumuniezh ivez.

Disoc'hoù fetis a zeu da-heul sinadegoù an tiez-kêr. An holl sinerien o deus kaset da benn oberoù pleustrek abaoe o sinadur. 3 zachenn labour zo evit kas ur politikerezh yezh efedus da benn : Tachenn labour gentañ : Lakaat ar brezhoneg war wel

Eil tachenn labour : Skignañ an anaoudegezh eus ar yezh

Trede tachenn labour : Implijout ar yezh dre gomz en darempredoù gant an dud

Lakaat ar brezhoneg war wel a vez graet gant an tiez-kêr da gentañ penn : an tri c'hard eus an oberoù sevenet zo graet evit lakaat ar brezhoneg muioc'h war wel d'an holl. Er panellerezh ent resis ez eus bet sevenet oberoù gant sinerien ar vro evit ar mare. Niverus eo an tiez-kêr o deus staliet plakennoù-straed en div yezh ivez (Kawan, Kemperven, Pouldouran, Tonkedeg, Tredraezh-Lokemo, Tregrom pe Plouilio). Gallout a reer ouzhpennañ Tregastell, Lannuon ha Plistin ha pa vefe diglok an ober-se enno evit c'hoazh. E savadurioù an tiez-kêr e weler brezhoneg er panellerezh alies c'hoazh. Tost an hanter eus ar c'humunioù o deus divizet ober ingal gant an div yezh pa vez staliet ur panellerezh, Lannuon en o zouez. Da-heul e laka ar sinerien ar brezhoneg war wel en o binvioù kehentiñ, dre logoioù ha paperoù talbennet divyezhek da skouer. Oberoù aes int da lakaat e pleustr hag a c'hall bezañ kaset da benn gant budjedoù ar c'humunioù bihan. Kevelerien eo ar sinerien evit brudañ ar c'helenn d'an dud deuet ivez dre skignañ skritelloù ar c'houlzad a vez aozet bep bloaz e Breizh gant an Ofis, da skouer. Tregastell zo ur skouer a-feson eus ur panellerezh divyezhek a galite e diabarzh an ti-kêr.

N'eo ket bet oberiant ar sinerien c'hoazh evit implij ar yezh dre gomz en darempredoù gant an dud. Div gumun hepken a ro da c'houzout sklaer d'o annezidi e c'haller dimeziñ e brezhoneg da skouer ha n'eo ket diorroet nemeur an degemer e brezhoneg en tiez-kêr c'hoazh pa c'hallfe un toullad anezho kinnig ar servij-se c'hoazh. Evit ma teufe da wir an oberoù dibabet gant an tiez-kêr e rankont bezañ aliet ha heuliet, setu ar pezh a ra an Ofis. Emdreiñ e c'hallfe ar vro, war verr dermen, gant an oberoù o deus embannet an tiez-kêr kaout c'hoant d'ober. D'ar gweledva yezhel e tenn an tri c'hard eus an oberoù dibabet gant an tiez-kêr, ha da gentañ penn da oberoù panellerezh. Dibabet ez eus bet oberoù aes da lakaat e pleustr, pa vez divizet ober gant an div yezh abaoe penn kentañ ar raktres, evel staliañ ur panellerezh diabarzh ha diavaez en ti-kêr hag er savadurioù zo e dalc'h an ti-kêr (ur vediaoueg pe ur sal liezimplij da skouer). Tiez-kêr zo o deus c'hoant da vont pelloc'h c'hoazh oc'h ober gant an div yezh bep tro ma vez staliet ur panellerezh nevez, evel e Plouared, pe o staliañ ur panellerezh heñchañ en div yezh ivez, evel e Ploueg-ar-Mor.

A-bouez eo al labour kaset da benn gant ar bed kevredigezhel war dachenn ar brezhoneg er vuhez foran, evit kizidikaat an dud ha goulenn ingal gant ar strollegezhioù foran kemer ar yezh e kont en o folitikerezh hag er servijoù foran da skouer. Ar gevredigezh **Ai'ta**, ur strollad savet evit difenn ar brezhoneg, a oa bet krouet er vro e miz Meurzh 2005 gant un nebeud tud yaouank. Oberiant eo ar strollad e Bro-Dreger. Kroget en deus d'ober traoù war dachenn an tiez-gar evit broudañ an SNCF d'ober gant ar brezhoneg (er panellerezh, dre gomz en degemer hag evit ar c'hemennadennoù). Krog eo da labourat war dachenn an tiez-post ivez, e Lannuon da skouer.

Klozadur preder ar bed foran

Degouezh dibar ar bloavezhioù diwezhañ-mañ, dre-vas, eo emouestl brasoc'h ar strollegezhioù foran, hag ar c'humunioù dreist-holl, a anavez muioc'h-mui ar brezhoneg evel un teul politikel da vezañ kaset war-raok war bep tachenn.

Morse ne oa bet kement a vrezhoneg er c'houlzadoù kabaliñ pe e programmoù ofisiel al listennoù hag evit dilennadeg miz Meurzh 2008. Deuet eo ar garta YAB da vezañ ur pal politikel evit meur a listenn. **Komprenet o deus an dilennidi e c'hallent ober kalz muioc'h evit ar yezh.**

Kemeret eo ar brezhoneg muioc'h e kont gant ar strollegezhioù foran abaoe 2004. Un araokadenn zo bet degaset gant krouidigezh an Ofis. Prizius eo bet labour ar c'hevredigezhioù lec'hel ivez evel Al Levrig ha Kreizenn Sevenadur Breizh Pempoull hag a vroud an dud d'ober muioc'h gant ar yezh er vuhez foran.

Bro Treger-ha-Goueloù zo unan eus ar broioù, pe ar vro zoken, m'emañ ar muiañ war wel ar brezhoneg er vuhez foran. Bev-mat eo ar brezhoneg war hentoù ar vro dre m'eo stank rouedad an hentoù departamant enni ha dre ma vez staliet ur panellerezh-hent divyezhek gant ar C'huzul-departamant. War greñvaat eo aet plas ar yezh er gweledva yezhel e kumunioù zo c'hoazh hag o deus embannet o youl da vont war-raok dre ar garta *Ya d'ar brezhoneg* da skouer. **Berzh a ra ar garta** er vro : un drederenn eus ar c'humunioù o deus degemeret anezhi c'hoazh. Kumunioù zo a grog d'ober gant ar brezhoneg adalek penn kentañ o raktresoù (er panellerezh diabarzh, er binvioù kehentiñ boutin), ar pezh zo efedusoc'h e-keñver disoc'h ha koust. Skouerioù a-zoare zo er vro eus ar pezh a c'hall kumunioù bihan ober gant an diviz-se (kemer ar brezhoneg e kont adalek penn-kentañ ur raktres). Araokadennoù a verzer neuze ha pa vefe ezhomm emskiantekaat c'hoazh ar strollegezhioù eus o atebegezh hag eus o galloud ober. Er vro-mañ e c'haller mont muioc'h war-du ar sistematigezh, ar politikerezh treuz c'hoazh ha kinnig aliesoc'h ar brezhoneg a-us pe a-gleiz d'ar galleg, evel ma'z eus bet graet e Kawan a-wechoù.

Gwelet-mat e vez ar yezh e lec'hioù zo eus ar vro, e Kawan, hag en tric'horn Lannuon-Plistin-Plouared. Digempouez zo er vro etre ar c'hornog hag ar reter, evel evit ar c'helenn. Ezhomm zo da ziorren plas ar yezh e pennoù-kanton reter ar vro da skouer : Landreger, ar Roc'h-Derrien ha Lezardrev. Dont a ra war wel un emdroadur war an tu mat e korn-bro Pempoull avat.

Bevennet-strizh eo oberoù an tiez-kêr da dachenn implij ar yezh er gweledva yezhel. Araokadennoù a chom d'ober war dachenn implij ar yezh en darempredoù gant an dud, evel degemer anezho e brezhoneg, da skouer, ar pezh a dalvez e ranker diorren ar stummadurioù evit an implijidi. Er vro m'eo an uhelañ an dregantad a skolidi divyezhek e vank kreizennoù dudi, sport, magourioù brezhonek, a c'hallfe bezañ skoazellet pe krouet war atiz ar strollegezhioù (kumunioù, DFKE, departamant)

E bro Treger-ha-Goueloù emeur en ur vro ma'z eo bev-mat ar yezh e-mesk an dud ha skoazellañ kalz a ra labour fonnus stank Al Levrig ha KSBP evit mont war-raok. Daoust m'eo Aodoù-an-Arvor an departamant kentañ en deus lakaet brezhoneg war e banellerezh-hent n'eo ket emdroet kalz e bolitikerezh yezh abaoe. N'eus ket bet lakaet e pleustr gant an departamant ur politikerezh yezh, ur politikerezh treuz gant palioù. Ne heuilh ket an departamant lusk Penn-ar-Bed dre sevel oberoù a denn d'ar brezhoneg drezañ e-unan, evel ar stignad war an tañva er skolioù da skouer. Chom a ra an departamant a ouestl d'ar brezhoneg ar budjed izelañ dre yezher daoust m'eo bet kresket ar budjed-se abaoe 2004.

Gallout a ra ar c'helenn divyezhek, an diskoulm pennañ evit stummañ brezhonegerien, bezañ diorroet kalz er vro gant ma vo frammet an diorren.

Ober gant ar brezhoneg er gevredigezh keodedel

Treuzkas ar yezh

Studiet eo bet **an treuzkas er familhoù** gant enklask an EBSSA e 1999. Dastumet e oa bet roadennoù e pep departamant war ar yezh bet desket gant an oadourien pa oant yaouank, an implij a rae ar re-se eus ar yezh da vare an enklask hag ar yezh treuzkaset ganto d'o bugale da 5 bloaz. Ne c'haller ket dielfennañ ar roadennoù-se er broioù abalamour m'eo re vihan ar standilhon implijet. Met gallout a reer lakaat an tuadurioù zo bet merzet da dalvezout evit ar vro memes tra. Kadarnaet o deus ar roadennoù-se ar giladenn a weler er gevredigezh evit treuzkas ar brezhoneg er familhoù. Abalamour d'un torr e chadenn deskiñ ar yezh etre ar vugale hag o zud ez eo aet an implij eus ar brezhoneg war zigreskiñ a-hed ar c'hantved diwezhañ. Abaoe ar bloavezhioù 1980 e vez komzet galleg ouzh ar vugale gant an holl dud pe dost. Kadarnaet eo bet an tuadur-se gant disoc'hoù sontadeg TMO-Fañch Broudig sevenet e Kerzu 2007.

Splann eo ez eus un ezhomm bras da gaout roadennoù resisoc'h war ar yezh komzet ouzh ar re vihan evit muzuliañ ent resis levezon an oberoù graet evit kas ar yezh war-raok, levezon ar c'helenn d'an dud deuet da skouer war ar yezh komzet er familhoù ha treuzkas ar yezhoù er familhoù. Disheñvel e tle bezañ al levezon-se hag an oberoù hervez ar broioù. **N'eus nemet un niveradeg yezhel aozet dre gumun hag a c'hallo degas seurt roadennoù.**

E 2005 e roe lañs Kuzul-departamant Penn-ar-Bed d'ar genstrivadeg Klaskerien ha Treizherien Soñjoù. Kevredigezhioù Al Levrig hag an UGB o deus aozet e 2008 ar memes kenstrivadeg war dachennar vro istorel Skolioù eus ar vro o deus kemeret perzh enni : skolioù Kawan, Plounevez-Moedeg, Perwenan, Pempoull, da skouer. Pal ar genstrivadeg-se zo adskoulmañ liammoù etre ar rummadoù ha lakaat an nevezvrezhonegerien da gaout divizoù gant ar vrezhonegerien a-vihanik. Reiñ a ra ar dra-se an tu da dreuzkas pinvidigezh ar brezhoneg d'ar vugale ha d'an oadourien a zesk ar yezh. Evit ar vrezhonegerien a-vihanik e talvoudeka o yezh vamm.

Servijoù d'an dud

War dachenn ar servijoù d'an dud war an oad n'hon eus renablet ober ebet evit ar mare. Gwall dreut eo plas ar brezhoneg er metoù-se er vro evel er broioù all. E Lannuon ez eus bet staliet ur panellerezh divyezhek en Annez Santez-Anna, met ne ginniger tra ebet e brezhoneg. Brezhonegerezed zo e-touez klañvdiourezed ospital Lannuon, ar pezh a rofe an tu da ginnig traoù e brezhoneg met ne vez graet netra war an dachenn-se gant renerezh an ospital. E bro Gerne, da skouer, ez eus bet kaset oberoù da benn. Daou bost skoazeller brezhonek o oa bet krouet e Pennospital Douarnenez e 2000 gant skoazell Mervent. Seurt servijoù a rankfe bezañ kinniget stankoc'h en tiez retredidi dre-vras e Breizh hag er vro, ent resis, dre m'eo uhel feur ar vrezhonegerien er boblañs. Danvez postoù labour hag a c'houlenn un anaoudegezh eus ar brezhoneg int.

E bed ar yec'hed eo talvoudus gouzout brezhoneg koulz evit labourat gant ar re gozh (ober a reont gant o yezh vamm pa vezont klañv gant kleñved Alzheimer da skouer) hag ar re

vihan. Kresket eo poblañs ar skolidi divyezhek er vro c'hoazh abaoe 2004. Gant an emdroadur-se e vez degaset ezhommoù nevez. Dont a ra war wel un ezhomm da stummañ tud a-vicher e bed ar yec'hed evit respont d'ar mankoù zo er vro hag e Breizh dre-vras. War dachenn an ortofoniezh eo talvoudus gouzout brezhoneg evit ober war-dro skolidi an hentadoù divyezhek da skouer. Kroget he doa un ortofonourez eus Pempoull da zeskiñ ar yezh evit ober mat war dro skolidi Diwan.

Bed ar vugaligoù

E-touez an 10 lec'h degemer (arsavioù-diwallerezh, magourioù stroll pe magourioù tiegezhel) renablet er vro, n'eus hini ebet a ra gant ar brezhoneg da vat evit ar mare. Ul labour kizidikaat zo kaset da benn evit disoc'hañ da benn, war an dachenn-se, er vro avat, gant ar gevredigezh Divskouarn da skouer : emvodoù foran zo bet aozet er vro evit kinnig hec'h obererezh ha klask kinnig ar yezh er raktres pedagogel e frammoù degemer ar vro. Krouet ez eus bet ur skourr lec'hel eus Divskouarn e 2009 gant un den dave evit klask renabliñ ar magerezed brezhonegerezed, evit sevel ha diorren ur rouedad.

Kaset e oa bet un enklask da benn gant Kreizenn Sevenadurel Lannuon ha sikour Divskouarn tro-dro da Lannuon evit niveriñ goulenn ar gerent e-keñver al lec'hioù degemer a ra gant ar brezhoneg e 2007. N'eo ket disoc'het an enklask-se da benn gant ur vagouri er vro c'hoazh. Met diskouezet he deus splann ar goulenn kevredigezhel zo er vro.

Divizet he deus ar vagouri Ti Poupigoù staliet e Bear ober gant ar brezhoneg. E-touez ar 6 lec'h degemer o deus sinet Karta Divskouarn emañ. Ur benveg eo a vez lakaet e pleustr evit brudañ ha kas ar yezh war-raok er magourioù abaoe diskar-amzer 2007 ; ul label a c'hall bezañ roet d'ar magourioù – live 1, 2 pe 3 – hervez plas ar yezh en darempredoù gant ar vugaligoù. Enfredet ez eus bet ur renerez brezhonegerez en diskar amzer 2007 ha sinet e oa bet ar garta e miz C'hwevrer 2008. Bear zo e bro Gwengamp met degemer a ra bugale a zeu eus K.K Kreiz Treger ivez. 40 bugel a vez degemeret er vagouri-se hag a zo an hini gentañ hag an hini nemeti en departamant oc'h ober ul labour kizidikaat ouzh ar brezhoneg

Sammet eo an darn vrasañ eus al labour kizidikaat-se gant ar bed kevredigezhel c'hoazh. N'eus ti-kêr ebet, bet sinet Ya d'ar brezhoneg gantañ, en dije dibabet an ober a denn da skoazellañ evit sevel ur vagouri vrezhonek da skouer. Skoazellet eo magouri Bear gant Kumuniezh-Kumunioù Kreiz Treger avat : dibabet he deus ar gumuniezh-se an ober eus YAB a denn d'ar skoazell evit sevel ur vagouri vrezhonek. Kaset he deus an ober-se da benn neuze.


E derou ul labour evit lakaat war sav lec'hioù degemer brezhonek emeur. N'eo ket disoc'het al labour kizidikaat kaset da benn er vro gant digoridigezh ebet evit ar mare. Gallout a reer soñjal er mikromagourioù evit dont a-benn da vont war-raok : frammoù degemer nevez int (degemer 9 bugel d'ar muiañ gant ur skipailh 3 den) gant reolennoù n'int ket ken strizh hag ar magourioù all, n'eus ket ar memes redioù e-keñver diplomoù an implijidi da skouer. Aesoc'h eo evit lakaat ar brezhoneg e mont en-dro al lec'hioù-se. Digoret eo bet mikromagouri gentañ ar vro e Kemperven e miz Meurzh 2009. Enskrivet eo bet evel pal er raktres pedagogel dont da vezañ divyezhek. N'eus ket bet tutaet brezhoneger ebet er skipailh-pad er penn-kentañ siwazh. Graet e vez un tamm gant ar brezhoneg er vikromagouri memes tra, dre levrioù brezhonek.

Dale zo bet tapet gant ar vro war dachenn ar vugaligoù e-keñver bro Brest (ma'z eus pemp magouri a ginnig un degemer e brezhoneg c'hoazh ha 6,3% eus bugale magourioù ar vro o deus un degemer e brezhoneg). Araokadennoù zo bet merzet abaoe 2004 koulskoude war dachenn ar c'hizidikaat evit kregiñ. Al labour kizidikaat-se n'eo ket trawalc'h evit stummañ yezherien c'hoazh, met gallout a ra broudañ ar gerent da zibab ur skol divyezhek da c'houde.

Dudi

Dudi evit ar vugale

Kinnig dudi d'ar vugale – Bloavezh-skol 2008/ 2009



N'eo ket stank an obererezhioù e brezhoneg aozet evit ar vugale er vro, kalz nebeutoc'h zo eget e bro Brest. N'eo ket aet kalz war-raok an obererezhioù kinniget d'ar vugale er-maez eus an amzer skol abaoe 2004. Ne oa tost obererezh dudi ebet aozet e 2004, nemet e kreizenn-dizoleiñ ar son e Kawan. Abaoe 2005 ez eus bet aozet stajoù kaiak ur sizhunvezh gant Ti ar C'hoadoù (diazezet er Chapel-Nevez, e bro Gwengamp), evit ar re zo 8-12 vloaz. Ar staj nemetañ eo diwar an 40 kamp bennak aozet e-pad hañv 2009. Aozet e oa bet ur c'hamp vakañsoù ur sizhunvezh gant Ti ar C'hoadoù ivez, e ti-feurm Kroaz Min e Lannuon. Degemeret e oa bet bugale etre 8 ha 12 vloaz gant ul labourer-douar brezhoneger.

Obererezhioù dizoleiñ a vez aozet er vro bremañ ivez hag na oant ket bet renablet e 2004. N'int ket niverus c'hoazh : tri framm a embann aozañ seurt obererezhioù er vro : skol ar C'hleuzioù e Pouldouran, Ti ar besketaerien e Lannuon hag ar c'hevredad a ginnig troioù war vor gant ar vag "Sant-C'hireg" e Perroz-Gireg.

Gouest eo frammoù all da zegemer bugale e brezhoneg ha da ginnig obererezhioù e brezhoneg er vro. N'eo ket stabil ar c'hinnig-se avat. Da skouer e c'halle kreizenn-dizoleiñ ar son diazezet e Kawan kinnig hec'h obererezh e brezhoneg gant ur buhezour brezhoneger. Ne c'hall ket kinnig un degemer brezhonek ken peogwir n'eus ket mui a implijidi vrezhonek eno. Gant ar greizenn-se e vez lakaet ar yezh war wel dre he fanellerezh memes tra. Betek 2008 e c'halle ar gêriadenn c'halian staliet e Pleuveur-Bodoù degemer bugale e brezhoneg ivez.

Aozet e oa bet un devezh hollvrezhonek evit skolidi an tri hentad e 2007 da skouer. Met aze ivez eo aet kuit an den a oa gouest da zegemer an dud e brezhoneg. Degemeret e c’hall bezañ skolidi e brezhoneg gant milin Krec’h Olen e Ploulec’h ivez. Brezhonekaet eo bet o zeulioù kinnig gant al Levrig e 2007 ha gweladennoù a vez aozet evit skolajidi Lannuon c’hoazh. Gallout a ra ar feurm bedagogel “La ferme enchantée” e Ploubêr kinnig un degemer e brezhoneg ivez. Gweladennoù brezhonek a veze aozet evit klasoù divyezhek Pempoull gant unvaniezh kevelourioù Pempoull-Landreger, ur gevelouri legumaj bras, bep bloaz. Bugale ar vro a c’hall kemer perzh **er skrivadeg abaoe 2007** hag a dro etre Kawan, Plouha ha Pempoull.

Brudet eo un tamm gwelloc’h an obererezhioù-se bremañ gant labour an UBAPAR. Skignet e vez levrigoù evit reiñ an titouroù d’an dud : unan zo gouestlet d’ar c’hreizennoù vakañsoù hañv hag unan d’ar c’hlasoù ha d’an obererezhioù dizoleiñ. Ul labour zo kaset da benn evit stummañ ar vuhezourien ha renerien ar frammoù gant an UBAPAR ivez. Dalc’het e vez stajoù stummañ (DABU¹⁰ ha DARE¹¹) en **Oaled e Treglonoù** abaoe 2002.

Dale zo gant ar vro evit ar pezh a denn d’an obererezhioù kinniget e diavaez ar skol d’ar vugale. Mankout a ra frammoù gouest da zegemer bugale ha da ginnig obererezhioù brezhonek er vro. Kreñv e c’hall bezañ ar goulenn abalamour da rouedad ar skolioù divyezhek. N’eus obererezh ebet a dennfe d’ar c’hoariva evit ar vugale kennebeut. N’eus kreizenn dudi ebet hag a zegemerfe bugale da Verc’her hag e-kerzh ar vakañsoù bihan hag a yafe en-dro e brezhoneg er vro kennebeut, evel ma vez graet e Roazhon pe e Naoned da skouer. Ur raktres zo evit distro-skol 2009 e Kawan gant skoazell ar gumuniezh-kumunioù avat : Dudi Kreiz Treger e anv a vo aozet war skouer Dudi Sant-Brieg : bep Sadorn goude merenn e tegemero bugale skolioù divyezhek an trowardroioù. Ezhomm zo da renabliñ al lec’hioù a c’hall bezañ gweladennet e brezhoneg hag a c’hall degemer skolidi peogwir ez eus tud gouest da ginnig o obererezh e brezhoneg er vro met ne roont ket da c’houzout d’an dud dre ret.

Diorroet e c’hall bezañ an dudi er vro ; frammoù evel Akwariom Tregastell hag en deus kaset da benn ul labour evit lakaat ar yezh war wel dre skrid ha dre gomz a c’hallfe mont pelloc’h, dre enfredañ ur buhezour brezhoneger pe stummañ ar c’hopridi war ar brezhoneg da vezañ gouest da zesachañ skolidi divyezhek ar vro ha pelloc’h zoken.

Talvoudus e vefe liammañ ar yezh gant Ti’pass, ar chekenn dudi (70€ ar bloaz) krouet gant Kuzul-departamant Aodoù-an-Arvor ha roet da holl skolajidi an departamant er 6^{vet} klas, ma vefe c’hoant gant an departamant da ziorren an obererezhioù evit ar vugale

¹⁰ Diplom Aotren war ar Buheziñ (BAFA e galleg).

¹¹ Diplom Aotren war ar Renerezh (BAFD e galleg).



Arvestoù ha gouelioù evit ar vugale

Abaoe 2004 e aoz **Daoulagad Breizh** troiadoù filmoù-bevaat e brezhoneg, gant **Dizale**, evit ar vugale. Ur c'henlabour zo etre Daoulagad Breizh ha kevredigezhioù lec'hel evit aozañ an abadennoù : Al Levrig eo ar framm dave evit ar vro.

388 bugel o doa kemeret perzh en abadennoù e bro Treger-ha-Goueloù evit troiad 2006-2007, gant 4 abadenn aozet (desachet he doa an droiad-se 6 505 a vugale e Breizh a-bezh), da lavaret eo un tamm nebeutoc'h eget an hanter eus ar skolidi divyezhek. Kresket eo an niver a skolioù a gemer perzh en droiad abaoe 2007 : skolidi eus 5 skol ouzhpenn o doa gallet sellet ouzh an tresadennoù-bev e-pad troiad 2007/2008 (o tont eus Perwenan, Tregastell, Ploubêr ha Perroz-Gireg (bloavezh krouidigezh ar skol)). Un drederenn eus al lec'hioù divyezhek ne gemeront ket perzh en troiadoù c'hoazh avat.

Evit ar wech kentañ e oa bet aozet Kan ar Bobl evit ar skolioù e 2007 e Kawan. Bodet e oa bet holl skolioù ar vro, un digarez evit diskouez d'an dud buhez ar brezhoneg er vro eo ar seurt darvoudoù ivez.

Dudi evit an oadourien

Aozet eo an obererezhioù e brezhoneg evit an dud deuet gant ar c'hevredigezhioù a ginnig kentelioù brezhoneg er vro. Kreizenn Sevenadur Breizh Pempoull eo ar gevredigezh oberiantañ war an dachenn-se. Klask a ra buheziñ korn-bro Pempoull hag aozañ traoù na dennont ket rik da obererezhioù breizhek. Kemeret he doa perzh en darvoud nozvezh ar mirdioù gant mirdi an dud a vor e miz Mae 2008 da skouer e Pempoull. Da vare Gouel Erwan he doa aozet un devezh dudi war an aod e Ploueg-ar-Mor. Ur staj kaiak a oa bet aozet e kreizenn bageal Logivi-Plaeranez e 2008 ivez, da skouer. Baleadennoù, prezennoù, stajoù kanañ pe fardañ krampouezh e brezhoneg a aozont ingal ivez. Skol Diwan Lannuon he deus aozet un abadenn Skrabell e brezhoneg e 2008 ivez.

Al Levrig a labour evit aozañ darvoudoù brezhonek ivez. Kaozeadennoù dreist-holl a vez kinniget gant ar c'hevread. Aozet e vez ar skrivadeg er vro gant Al Levrig ivez, e kenlabour gant aozadurioù kelenn all (KSBP ha Kalon Plouha). 50 den bennak o doa kemeret perzh e dalc'h 2009 aozet e Kawan.

Eus tu an obererezhioù hengounel e vez aozet beilhadegoù gant **Dastum Bro Dreger** e meur a gumun eus ar vro. Desachet e vez ur bern tud gant seurt abadennoù. En enor da Varia Prat e oa bet aozet un droiad beilhadegoù gant Strollad Beilhadegoù Treger e 2006, e Plouilio, e Tregastell, e Perwenan hag e Rospez.



Arvestoù ha gouelioù evit an dud deuet

N'eo ket stank an abadennoù sevenadurel brezhonek aozet er vro. N'eus ket a strollad c'hoariva a vicher enni. Met krouet e oa bet ur strollad c'hoariva nevez a-youl vat e 2008 : **C'hoari Las**. Ar gevredigezh Nevez-Amzer e Tregastell a aoz bep bloaz ur pezh-c'hoari kinniget gant Strollad ar Vro Bagan. Saliou ar vro ne zegemeront ket alies pezhioù-c'hoari kinniget gant strolladoù all memes tra.

War dachenn ar sonerezh ez eus bet diwanet un strollad sonerezh funk, frouezh ar c'helenn divyezhek kreñv er vro : **Francis Jackson**.

Dister eo plas ar brezhoneg er sinema c'hoazh. Teulfilmoù eo an darn vrasañ eus ar filmoù a vez produet. Bannet e vez ar pezh a vez produet e brezhoneg er chadennoù skinwel. Da vare Gouel Erwan e oa bet skignet Marion ar Faoued e 2005 e Lannuon met n'eus ket bet adaozet abadennoù a seurt-se abaoe.

Krog eo Daoulagad Breizh da aozañ abadennoù evit an dud deuet abaoe 2007 diwar skouer troiadoù an tresadennoù-bev. N'eus bet abadenñ ebet aozet e bro Treger-ha-Goueloù c'hoazh.

Aozet e oa bet gant Poellgor an Tarv ur saloñs arzourien divyezhek, Awen Breizh, e Tregastell e 2007. Skoazellet eo bet aozadur ar saloñs-se gant teir c'humun unanet dre ur gevrat evit an touristerezh, Tregastell, Pleuveur-Bodoù ha Trebeurden.

War dachenn ar festivalioù n'eus nemet Gouel Kan ar Vartoloded a ra gant ar brezhoneg. Ar festival kentañ e Breizh eo en doa bet label an emglev Ya d'ar brezhoneg (label 1), e miz Mae 2008. Ul labour a feson a gas da benn : lakaat a ra ar brezhoneg war wel, dre e lec'hienn Genrouedad, dre banellerezh ar gouel, ar skritelloù, ul logo divyezhek ; dre gomz ivez oc'h ober gant ar yezh e-kerzh ar gouel da skouer (a-hed ar gouel e vez klevet brezhoneg war kaeoù Pempoull, dre sono ar festival a embann pep tra e brezhoneg). Re dreut eo c'hoazh plas ar brezhoneg e festivalioù all ar vro (Festival an Hortensia e Perroz-Gireg, Festival Islandiz ha Douarneveziz). Talvoudus eo diorren implij ar brezhoneg e seurt darvoudoù a vez darempreded kalz gant an dud ha gant an douristed e- pad an hañv : 120 000 a dud a zeu da festival Pempoull da skouer ha 120 den a labour eno a-youl vat. Ur skeudenn eus ar vro int en diavaez.

Klozadur an dudi

N'eo ket diorroet mat an dudi evit ar vugale er vro ha pa vefe aet war-raok abaoe 2004. Aozañ a reer ur c'hamp vakañsoù er vro bremañ met unan hepken, aozet gant Ti ar C'hoadoù zo diazezet er vro e-kichen. Koulskoude e respontfe an dudi-se d'un ezhomm, rak stank eo ar skolidi divyezhek er vro. Lec'hioù all zo gouest da zegemer bugale e brezhoneg koulskoude hep ma vefent bet renablet avat. Aozet eo an obererezhioù brezhonek kinniget d'ar vugale **gant ar bed kevredigezhel** c'hoazh. Ha pa vefe kinniget brezhoneg dre skrid ha dre gomz en Akwariom Tregastell ne c'hall ket ar c'hlasoù divyezhek gweladenniñ al lec'h e brezhoneg da skouer. **Tachennoù zo da c'hounit gant ar strollegezhioù foran** e bed an dudi e brezhoneg evit ar vugale : diorren an degemer e brezhoneg er frammoù ha divyezhekaat c'hoazh ar gweledva yezhel a vez meret ganto evit respont da c'houlenn ar rouedad skolioù divyezhek.

Lusket eo ar vuhez sevenadurel vrezhonek gant ur rouedad kevredigezhel pe gant hiniennoù zoken, ha n'eo ket sammet gant ar frammoù sevenadurel foran. Perzh Al Levrig ha Kreizenn Sevenadur Breizh Pempoull zo pouezus evit luskañ ar vuhez sevenadurel er vro, dre gelaouiñ an dud, hag evit aozañ obererezhioù e brezhoneg.

N'eus ket a vrezhoneg e lec'hioù pennañ ar vuhez sevenadurel e bro Treger-ha-Goueloù c'hoazh, evel er greizenn "Karrez hud" meret gant Tolpad-kêrioù Lannuon da skouer. E-keñver brudañ ha budjed eo pouezus d'ar strollegezhioù lec'hel sammañ ar brezhoneg en o folitikerezh sevenadurel a-fet programmiñ. Er vro e ranker tennañ splet eus nerzh ar strollegezhioù foran a fell dezho diorren ar brezhoneg er gevredigezh evit kas oberoù a denn d'an dudi ha d'an darvoudoù sevenadurel brezhonek war-raok. Krog eo Kumuniezh-kumunioù Kreiz Treger da vont war an hent-se, gant an dibab da skoazellañ ur greizenn dudi e distro-skol 2009.

Buhez speredel

Gant an Iliz e vez implijet ar brezhoneg a-wechoù. Eskopti Sant-Brieg ha Landreger a laka ar yezh war wel dre e lec'hienn Genrouedad, enni meur a bajenn vrezhonek ; graet e vez al labour-se gant ur bodad tud a-youl vat. Savet ez eus bet gant an Eskopti ul levr oferennoù divyezhek. Oferennoù a vez aozet ur wech ar miz er vro, tamm-pe-damm, evel e Lannuon pe e Landreger, da skouer.

Ul labour kelaouiñ zo d'ober evit reiñ da c'houzout ez eus obererezhioù e brezhoneg evel an oferennoù e brezhoneg pe al levr oferennoù brezhonek.

Dibaot-kaer eo an digarezioù da gaout kelennadurezh war ar relijion gristen e brezhoneg hiziv an deiz. Kentelioù katekiz e brezhoneg a vez kinniget e Lannuon da vugale zo (8 ha 10 vloaz) abaoe 2007, diwar atiz ur person. Aozañ a ra bep daou viz devezhioù war an doare da vevañ e feiz e brezhoneg gant prezegennoù, oferennoù ha predoù. Gwelet a reer ezhommoù stummañ bras gant ar gloer evit gallout kenderc'hel gant ul liderezh brezhonek en dazont.

Hiziv an deiz n'eus koulz lavaret plas ebet evit ar brezhoneg er relijionoù er-maez eus ar gatoligiezh pe n'hon eus renablet tra ebet.

An embann

E Lannuon eo staliet **Kuzul ar Brezhoneg**, ur framm hag a labour war dachenn an embann. Strollañ a ra 6 ti-embann. Degas a ra dezho ur skoazell evit aesaat ha micherelaat o labour. Kas a ra da benn ul labour prientiñ evit an embann (prientiñ ar skridoù, adlenn), brudañ labourioù (sevel katalogoù, standoù¹²) ha merañ koumanantoù kelaouennoù zo. 20 % eus an titloù embannet e brezhoneg e 2008 zo liammet ouzh Kuzul ar Brezhoneg, da lavaret eo int titloù embannet gant tiez-embann ezel.

Kelaouennoù a vez embannet ivez, evel al Liamm, al Lanv hag Hor yezh. Kuzul ar Brezhoneg a vod en holl 3 fost labour leunamzer, staliet e Lannuon.

Ar mediaoù

Ar c'hazetennoù

Abalamour d'an diouer a vrezhoneg e kazetennoù sizhuniek ar vro, le Trégor, la Presse d'Armor ha l'Echo de l'Armor et de l'Argoat, e oa bet roet lañs gant ur strollad kevredigezhioù sevenadurel breizhek d'ur stourm evit kaout pennadoù brezhonek enno, dre ur sinadeg e derou 2008. Goulenn a ra ar strollad-se digant ar c'hazetennoù-se kaout pennadoù brezhonek sizhuniek, enfredañ kazetennerien vrezhonek ha stummañ an implijidi war ar yezh. En tu all da 1 000 sinadur o deus bet. Kentelioù brezhoneg ha pennadoù evit displegañ anvioù-lec'h a veze embannet e-barzh le Trégor, savet gant Kuzul ar Brezhoneg. N'eus ket bet kendalc'het peogwir e veze graet gant ar c'hevredigezhioù ha ne oa budjed ebet gouestlet d'an ober-se. N'eus nemet dre vont war vicherelaat e c'haller stabilaat pennadoù brezhonek er c'hazetennoù, ar pezh en deus graet departamant Aodoù-an-Arvor p'en deus enfredet ur gazetennerez dizalc'h brezhonegerez.

¹² Dalc'het en deus ur stand e saloñs al levrioù e Pariz e miz Meurzh 2009 da skouer.

Er skinwel

War ziskenn kalz ez a ar programmoù kinniget er vro hag e Breizh dre-vras gant fin ar programmoù brezhonek e TV Breizh (ne chom abadenñ vrezhonek ebet e kael programmoù 2008/2009 e TV Breizh) e-keñver ar pezh a oa e 2004.

➤ France 3 Ouest

Degemer a ra bro Treger-ha-Goueloù holl abadennoù brezhonek France 3 Ouest. **Heñvel e oa chomet an amzer gouestlet d'ar brezhoneg e programmoù ar chadenn-se abaoe 2003.** Ur cheñchamant a zo bet e renerezh an abadennoù brezhonek e France 3 Ouest e 2008. Emdroet eo bet an abadennoù brezhonek kinniget d'an dud gant un abadenñ gouestlet d'ar sonerezh (16 munut), **“Son da Zont”**, en distro-skol 2008, skignet d'ar sadorn e plas “Digor Din”. Kendalc'het ez eus bet gant ar 5 programm brezhonek all. **Kinniget e vez 1 eur 50 a abadennoù brezhoneg bep sizhun.**

Programmoù evit ar re yaouank zo. **“Mouchig-Dall”** (23 munut) eo an abadenñ nemeti e Frañs graet evit ar vugale en ur yezh all estreget ar galleg ; krouet e oa bet e 2003 ha skignet e vez d'ar Merc'her vintin. Sketchoù, tresadennoù-bev, programmoù produet e brezhoneg evit ar vugale ha teulfimoù sevenet er skolioù divyezhek a vez kinniget.

Programmoù evit ar rummad 15-35 bloaz zo bet lakaet e plas : **“Te ha Me”** (8 munut) a ginnig ur pennad-kaoz etre ur brezhoneger yaouank hag al luskerez ; krouet e oa bet e 2004 ha skignet e vez d'ar Sadorn vintin (skignet e oa bet ar 100^{vet} abadenñ e miz Du 2007). **“Son da Zont”** a lak da glevet birvilh ar sonerezh a-vremañ e Breizh. Sonerien a vez pedet da c'hoari war-eeun en abadenñ a ginnig d'an dud ivez klevet sonadegoù bras ha dielloù eus ar c'hantved tremenet.

Ouzhpenn an abadennoù skignet e Breizh velestradurel a-bezh e resever e bro Treger-ha-Goueloù keleier **“An Taol Lagad”** (4'30) skignet da 12e15 eus al Lun d'ar Sadorn. E Brest e vez savet ar bommoù keleier-se. Ar pezh a dalvez 200 bomm keleier bep bloaz ha 400 teulfilm .

Gallout a reer sellet ouzh holl abadennoù brezhoneg France 3 enlinenn war o lec'hienn Genrouedad ivez. Abaoe miz Mae 2008 ez eus ul lec'hienn gouestlet da v**“Mouchig-Dall”** penn-da-benn. Adskignet e vez programmoù brezhonek e-pad an hañv ivez. Abadennoù arbennik a vez skignet gant France 3 Ouest evel Prizioù France 3 e miz Genver pe redadeg Tro Bro Leon pe sonadeg an Nozvezh keltiek e miz Mezheven da skouer.

Dre ar Genrouedad e teu skignerien all war wel, evel **“Brezhoweb”** hag a skign ar sitkom “Ken Tuch” da skouer. A-benn diorren ar pezh a gaver e brezhoneg ez eus bet roet lañs d'ul lec'hienn a c'hall an holl kemer perzh enni, Kaouenn.net. Enni e c'hall an holl re en c'hoantao kinnig danvez klewelet e brezhoneg d'ar wiaderien all, abaoe derou 2007. Lusket eo al lec'hienn-se gant tud a-youl vat staliet er vro hag e Kawan ent resis, liammet gant Ti ar Vro. Krouet ez eus bet ur skinwel skignet war ar Genrouedad, Armor TV. Estreget kemer perzh e produiñ WebNoz ne ginnig ket abadennoù brezhonek.

Er skingomz

Betek-henn n'eus radio brezhonek ebet e bro Treger-ha-Goueloù, hag hi ar vro enni ar feur uhelañ a vrezhonegerien er boblañs. Gallet en defe raktres Kaouenn FM klokaat ar rouedad skingomzioù kevredigezhel lec'hel eno. Met korballet e oa bet e deuliad da c'houlenn ur frekañs digant ar CSA e 2007.

Abadennoù brezhoneg a vez skignet er vro ha muioc'h a zo anezho bremañ zoken : **tro-dro 65 eurvezh** a vez skignet bep sizhun er gael programmoù 2008/2009 pa veze



kinniget 40 eurvezh a brogrammoù brezhonek e 2003/2004. An div drederenn eus ar programmoù-se a vez kinniget gant ar skingomzoù kevredigezhel c'hoazh. Dont a ra ar c'hresk-se eus abadennoù Radio Kreiz Breizh hag a zo aet kalz war-raok abaoe 2004.

An darn vrasañ eus an abadennoù brezhonek a c'haller selaou er vro a vez kinniget gant Radio Kreiz Breizh staliet e Sant-Nigouden, e bro Kornôg Kreiz Breizh. Ne c'haller ket klevet ar skingomz lec'hel-se e pep lec'h er vro avat. Mankout a ra ur frekañs e Lannuon evit skignañ gwelloc'h er vro a-bezh.

Kresket-kalz eo an abadennoù brezhonek kinniget gant ar skingomz-se er pevar bloaz diwezhañ : tost da 40 eurvezh bep sizhun bremañ, pa oa war-dro 20 e 2004. Kresket eo an niver a brogrammoù skignet a-drugarez an eskemmoù abadennoù etre ar skingomzoù izili eus ar rouedad Brudañ ha Skignañ. Met an abadennoù produet gant ar skingomzoù all a ya d'ober nebeutoc'h eget ur bempvedenn eus an abadennoù brezhonek skignet gant Radio Kreiz Breizh. Ar peurrest a vez produet gant Radio Kreiz Breizh e-unan. Produiñ a ra div abadenn vrezhonek bemdez (“Prim d’ar beure” ha “Tud eus ar vro”) ha meur a gronikenn bemdeziek ivez evel “Merenn vihan” pe “War al leur”. Troet eo kalz abadennoù RKB gant ar glad hag ar vrezhonegerien gozh. Evit mont muioc'h war-du ar grennarded en deus roet lañs ar skingomz d’un abadenn sevenet gant liseidi Karaez. Lañs zo bet roet d’un abadenn geleier boutin d’ar peder skingomz izili eus ar rouedad Brudañ ha Skignañ (a vod Arvorig FM, Radio Kerne, Radio Bro Gwened ha Radio Kreiz Breizh) e 2008. Un hanter eurvezhiad a abadenn vrezhonek vizek a vez kinniget gant RCF Côtes D’armor “Sent ha Tud hor bro”.

Goloet e vez bro Treger-ha-Goueloù a-bezh gant abadennoù France Bleu Breizh-Izel, gant 4 frekañs er vro (e Lannuon, Perroz-Gireg, Landreger ha Pempoull). Kemmet eo ar programmoù brezhonek skignet war France Bleu Breizh-Izel e-keñver ar pezh a oa e 2004. Digemm e oa chomet ar c’hementad abadennoù brezhonek skignet betek 2006. Gwelet e oa bet un adkreizennañ e 2006 : tennet e oa bet ur prantad a bouez digant ar programmoù lec'hel evit lakaat un abadenn produet e Pariz. Un digresk a oa bet evit an abadennoù e brezhoneg gant kael an distro-skol 2006 : tennet e oa bet un eurvezh digant abadenn bemdeziek an noz. Adkinniget e vez un abadenn produet gant France Bleu Breizh-Izel e deroù an endervezh, un abadenn bemdeziek divyezhek (Culture Breizh, 90 munut) ma vez kinniget kronikennoù e brezhoneg war troioù-lavar ha ma vez aterset un den pedet hag a c’hall bezañ ur brezhoneger.

Skignet e vez bommoù keleier pemdeziek e brezhoneg, “Keleier Breizh”, pemp gwezh bemdez (7 munut en holl). Skignet e vez un abadenn bemdeziek e fin an endervezh (“An abadenn”, 90 munut). Div abadenn a vez skignet e-pad an dibenn sizhun : “Breizh o Pluriel” (3 eurvezh troc’het gant bommoù keleier e galleg) d’ar Sadorn ha “Hentoù treuz” (div eurvezh troc’het gant bommoù keleier e galleg) skignet d’ar Sul. Kinniget e vez war-dro **17 eurvezh 30 a brogrammoù brezhonek rik** bep sizhun e kael programmoù 2008-2009 ha **25 eurvezh** ma kemerer e kont **ar programmoù divyezhek**.

War-du ur rouedad skingomz kevredigezhel e brezhoneg

Evit ledanaat ar c’hinnig abadennoù brezhoneg e kenlabour ar skingomzoù kevredigezhel a ginnig abadennoù brezhonek : krouet o deus ur rouedad eskemm abadennoù. Aet eo an div skingomz hollvrezhonek, Arvorig FM ha Radio Kerne pell en aozadur ar rouedad-se : ouzhpenn eskemman programmoù e lakaont o barregzhioù e boutin ha kenbroduiñ a reont programmoù. Mont a ra ar c’henlabour-se en-dro gant ar gevredigezh **Brudañ ha skignañ**. Bodet eo ar pevar radio kevredigezhel lec'hel hag a eskemm o abadennoù kenetrezo er framm-se bremañ. Gant ar rouedad-se e vez savet keleier bemdez abaoe 2008 : ur goprad eus pep hini eus ar 4 radio lec'hel a labour asambles da sevel Keleier ar vro. Skoazellet eo ar postoù-labour-se gant ar C’huzul-rannvro

An teknologiezhioù nevez o harpañ ar skingomz e brezhoneg

Aesoc'h eo deuet da vezañ selaou an abadennoù brezhonek gant ar Genrouedad. Gallout a reer selaou holl brogrammoù ar skingomzoù kevredigezhel FM war-eeun enlinenn dre al lec'hienn **Stalig** skoazellet gant bro Treger-ha-Goueloù da skouer (abaoe miz Gwengolo 2004) ha dre **an Tour Tan** abaoe deroù 2005. Gallout a reer podskignañ peder abadenn produet gant France Bleu Breizh-Izel : “Hentoù Treuz”, “Breizh o pluriel”, “An Abadenn” hag ar gronikenn “Un toull ba'n avel”. Gallout a reer selaou Keleier Breizh enlinenn ivez war lec'hienn ar skingomz. Dale zo bet tapet gant ar brezhoneg e-keñver yezhoù all koulskoude. N'eus webradio ebet c'hoazh da skouer.

Marc'had al labour e brezhoneg


E-kerzh an nevezamzer 2006 hor boa savet un enklask war *Ar postoù-labour hag ar brezhoneg*. Savet e oa bet ur c'houlennaoueg enni tri c'hraf pennañ :

- stad an traoù d'ar 1^{añ} a viz Genver 2006 (an niver a bostoù-labour a oa enno brezhonegerien evit implijoù hag a c'houlenn un anaoudegezh eus ar brezhoneg),
- ar pezh a c'hellfe bezañ (an niver a bostoù a vefe mat kaout brezhonegerien enno met zo tud divrezhonek enno),
- ar pezh a c'hellfe bezañ a-benn 2010.

Bewech ez eo an niver a bostoù-labour kevatal da implijoù leunamzer (KILA) a zo bet goulennet ; kement-se a dalvez eo brasoc'h c'hoazh an niver a dud implijet, dre ma labour lod anezho darnamzer.

Gant **tost 56 a bostoù-labour KILA brezhonek** renablet e 2006 ez eo bro Treger-ha-Goueloù ar 7^{vet} **bro ma kaver ar muiañ a dud o labourat e brezhoneg**. Kalz a dud a c'hallfe kinnig un degemer e brezhoneg en embregerezhioù da skouer met diaes e chom plas ha statud ar yezh er gevredigezh.

A-live gant bro an Oriant emañ Treger-ha-Goueloù evit an niver a bostoù labour a c'houlenn un anaoudegezh eus ar brezhoneg hag a-raok bro Gwengamp. Muioc'h a bostoù labour e brezhoneg zo e bro Kornôg Kreiz Breizh (a-drugarez kêr Garaez hag a zegemer sez Ofis ar Brezhoneg, lise Diwan ha frammoù all evel DAO pe Roudour da skouer) eget er vro-mañ avat. Izel e chom an niver a bostoù labour a c'houlenn un anaoudegezh eus ar brezhoneg pa ouzer eo bro Treger-ha-Goueloù ar vro m'eo an uhelañ feur ar vrezhonegerien er boblañs.



Gallout a reer labourat e brezhoneg war postoù kelenn, dreist-holl, e bro Treger-ha-Goueloù. Splannoc'h eo an dra-se er vro eget e Breizh dre-vras, ma kaver an tri c'hard eus ar postoù labour e bed ar c'heleñn.

N'eo ket diorroet bed al labour e brezhoneg, c'hoazh , e bro Treger-ha-Goueloù er-maez eus ar c'heleñn. An digempouez evit ar c'heleñn zo kalz brasoc'h er vro eget e Breizh dre-vras pe e bro Brest da skouer ma'z eus nebeutoc'h eget tri fost war 4 er c'heleñn.

N'eo ket niverus an implijerien a enfred brezhonegerien. Ne zegemer ket ar vro frammoù bras o deus ezhomm da duta brezhonegerien : n'eus na skol-veur, na kreizenn stummañ ebet evit an dud deuet, na media brezhonek ebet kennebeut. N'eo ket diorroet gennad an dudi evit ar vugale (aozet eo kamp vakañsoù nemetañ an hañv gant ur framm n'eo ket staliet er vro da skouer). N'eo ket bras an niver a bostoù ouzhpenn a vefe talvoudus e vefe brezhonegerien enno er vro, hervez respontoù an enklask. E 2006 ne oa bet niveret nemet 3 fost labour a vefe talvoudus e vefe brezhonegerien enno. Ezhomm zo da gizidikaat an implijerien ouzh talvoudegezh ar barregezhioù yezh e bed al labour. Ezhomm en deus marc'had al labour brezhonek da vezañ frammet ivez : enfredet ez eus bet nannvrezhonegerien er vikromagouri e Kemperven da skouer peogwir ne oa ket bet kavet tud barrek war micher ar vugaligoù **ha** barrek war ar yezh.

Ur greizennig labour e brezhoneg eo Ti ar Vro bro Treger-ha-Goueloù er vro : 5 post-labour e brezhoneg zo eno e 2009. Deuet eo ar raktres kreizenn dudi diwar al lusk zo el lec'h-se ha neuze krouidigezh postoù labour a c'houlennno barregezh war ar brezhoneg.


E diagnostik 2004 e oa bet dreistpriziet an niver a bostoù brezhonek er vro da 80. Er-maez eus ar c'heleñn n'eo ket emdroet kalz an niver a bostoù zo ezhomm da gaout brezhonegerien enno.

An armerzh

E 2001 e oa bet roet lañs d'ar c'houlzad *Ya d'ar brezhoneg*. A-benn miz Meurzh 2009 e oa bodet 635 a oberourien gevredigezhel hag armerzhel (hiniannoù ha frammoù nann-


publik anezho) gant an Ofis en-dro d'un dra eeun : ober muioc'h gant ar brezhoneg war ar pemdez. Ur skoazell deknikel a vez roet d'ar sinerien, abaoe ar penn kentañ, evit harpañ anezho en o c'hoant da ziorren plas ar brezhoneg. Kinnig a ra an Ofis d'ar sinerien kas oberoù resis da benn. Evel-se e c'hall ar sinerien mont war-zu ul label e-giz ma vez graet gant ar strollegezhioù foran abaoe 2004.

Dasparzh sinerien Ya d'ar brezhoneg dre gumun– Miz Meurzh 2009



43 siner a oa e bro Treger-ha-Goueloù e miz Meurzh 2009, da lavaret eo 6,8% eus hollad ar sinerien. Kresket eo an niver a sinerien abaoe 2004 (14 siner ouzhpenn zo er vro bremañ, un hanterenn ouzhpenn e-skoaz 2004). Merzout a reer tri fol pennañ gant **Perroz-Gireg**, **Lannuon** ha **Pempoull** hag a vod an div drederenn eus sinerien ar vro. N'eus siner ebet e Landreger avat.

Dasparzh sinerien Ya d'ar brezhoneg dre rummad– Miz Meurzh 2009



Disheñvel eo dasparzh ar sinerien er vro diouzh ar pezh ez eo e Breizh a-bezh : n'eo ket ken kreñv pouez bed an armerzh er vro. E Breizh a-bezh emañ an hanter eus ar sinerien e bed an armerzh. Sinerien o tont eus ar bed sevenadurel eo an hanter eus sinerien an Emglev Ya d'ar brezhoneg er vro. Ar bed-se eo en deus douget an oberoù pleustrekañ evit lakaat ar brezhoneg war wel (yezh labour ha yezh kehentiñ), gant frammoù emouestlet abaoe pell alies evel **Kuzul ar Brezhoneg** pe **Al Levrig**. Er-maez eus ar metoù-se e vez implijet ar brezhoneg er c'hehentiñ en un doare arouezel (dre ul logo divyezhek peurgetket). Dibab a ra ar sinerien eus bed an armerzh lakaat ar brezhoneg war wel, nebeut anezho a duta brezhonegerien avat. Implijout a reont kit panellerezh an Ofis da skouer. Er vro n'eus nemet Intermerc'had Ploueg-ar-Mor en deus sinet ar garta ha lakaet panelloù divyezhek. Graet ez eus bet ul labour don gant Al Levrig evit kas war-raok implij ar brezhoneg e bed ar c'henwerzh : en Intermerc'hadoù Pempoull ha Lannuon, hag e Leclerc Lannuon da skouer ez eus bet staliet ur panellerezh klok. Hogen gwall vresk eo an araokadennoù-se er gourmarc'hadoù. Staliet e veze panelloù divyezhek e pep lec'h da vare an distaolioù, da skouer, gant **Lannion Coeur de Ville**, kevredigezh kenwerzhourien kreiz-kêr. Met paouezet int abaoe m'eo bet cheñchet ar burev hag aet eo an ober-se da get. N'eo ket ken kreñv na ken frammet ar goulenn hag ar pezh a oa e 2004. Gwelet a reer disoc'h an divizoù er bed-se kalz buanoc'h eget e bed ar strollegezhioù avat.

Klozadur

implij ar brezhoneg er gevredigezh keodedel

Daoust ma'z eo bro Treger-ha-Goueloù ar vro m'eo an uhelañ feur ar vrezhonegerien er boblañs, n'eus ket lañs enni kement-se evit implij ar yezh er gevredigezh, pa geñverier gant broioù all : n'eus magouri ebet enni, skingomz ebet, kreizenn dudi ebet ha nebeut-tre a obererezhioù kinniget d'an dud deuet pa geñverier gant an niver a dud a zesk ar yezh hag an niver a dud a oar. Labour zo bet kaset da benn er bloavezhioù diwezhañ gant ar bed kevredigezhel evit mont war-raok ha klask adaptout an dale war dachenn ar media da skouer pe war dachenn ar vugaligoù. Met n'eo ket disoc'het c'hoazh. Ul labour kizidikaat zo bet sevenet hag a c'hallo bezañ talvoudus evit disoc'hañ gant un dra bennak war verr termen memes tra.

Talvoudus-kenañ eo kaout tro da lakaat ar brezhoneg e-maez ar skolioù. Gant an tuadur a weler er vro war grenn dermen, ez eus arvar ne vefe mui ar brezhoneg nemet yezh ar skol e bro Treger-ha-Goueloù. Un nebeud araokadennoù zo bet graet abaoe 2004 war dachenn an dudi koulskoude. Tennañ a ra splot ar vro eus obererezhioù aozet e lec'h all evel troiadoù Daoulagad Breizh pe ar c'hamp vakañsoù dalc'het er vro aozet gant Ti ar C'hoadoù. Met n'eus bet degaset respont ebet na gant ar bed prevez (kevredigezhioù pe embregerezhioù) na gant ar bed foran evit kinnig servijoù da vugale ar skolioù divyezhek er vro c'hoazh.

Arrouezius eo stad bed al labour er vro eus stad ar brezhoneg er gevredigezh dre-vras : n'eo ket diorroet ar postoù-labour e brezhoneg e-maez bed ar c'helenn. Splann eo ez eus ezhomm da stummañ tud varrek war ar yezh ha war ur vicher all er vro.

Ezhomm en deus ar bed kevredigezhel da vezañ harpet ha heñchet gant ar bed publik evit disoc'hañ ha kreñvaat e obererezh en amzer da zont. War tachennoù zo a denn d'ar vuhez pemdeziek e c'hell ar **strollegezhioù foran lec'hel** kaout ur gwir emell evit kas ar brezhoneg war-raok dre ar perzh bras o deus da c'hoari e mererezh aveadurioù zo. Skouerioù a c'heller reiñ war dachenn ar servijoù d'an dud (ober gant ar yezh er magourioù, kelaouiñ ar gerent nevez eus talvoudegezh an divyezhegezh abred, obererezhioù e brezhoneg en tiez retredidi pe en ospitalioù), an dudi (endro divyezhek en aveadurioù foran evit ar sport hag ar sevenadur, heñveldra er gouelioù, obererezhioù e brezhoneg er c'hreizennoù dudi hep herberc'h hag er c'hreizennoù vakañsoù), ar sevenadur (broudañ ar c'hrouiñ sonerezh dre sevel un taol-lañs skoazellet gant an departamant ha kêr Lannuon da skouer), ar mediaoù (abadennoù brezhonek pa vez savet ur skinwel lec'hel), h.a. E deroù an hent-se emeur e bro Treger-ha-Goueloù gant ar skoazell he deus prometet Kumuniezh-kumunioù Kreiz Treger degas d'ur greizenn dudi e Kawan. N'eus kargad a gefridi ebet evit ar brezhoneg e strollegezhioù ar vro.

Klozadur

Bro Treger-ha-Goueloù eo ar vro m'emañ en e uhelañ dregantad ar skolidi divyezhek er boblañs skol koulz ha dregantad ar vrezhonegerien er boblañs dre-vras. Tennañ gounid eus an tu-kreñv-se zo d'ober evit diorren ar yezh e-maez ar skol : er vuhez foran hag er gevredigezh dre-vras.

Dibarderioù bro Treger-ha-Goueloù evit ar brezhoneg

Emañ e touez ar broioù m'emañ ar c'helenn divyezhek en e uhelañ. Er vro-se e tlefe bezañ en he brasañ **levezon ar c'helenn divyezhek er gevredigezh**. Daougementet eo bet feur ar c'helenn divyezhek er vro koulz ha niver ar skolidi divyezhek en ur ober 10 vloaz. Daoust da se e chom tuioù gwan gant an hentad divyezhek er vro: **diaes e vez digeriñ lec'hioù nevez** en hentad publik peurvuiañ (n'eus bet krouet lec'h publik nevez ebet abaoe hini Plounevez-Moedeg e 2002), n'eo ket bet kempouezet ar c'helenn divyezhek kinniget etre kornôg ha reter ar vro kennebeut er pemp bloaz diwezhañ hag isdiorroet e chom an hentad en eil derez, gant ur c'hinnig en ul lec'h hepken er vro.

Amañ, evel e lec'h all e Breizh, e kendalc'h ar c'helenn divyezhek da vont war-raok atav daoust m'eo tuet ar c'hresk da c'horrekaat muioc'h amañ eget e lec'h all. Met an doareoù all da gelenn brezhoneg er skol a hañval bezañ laosket a-gostez gant an ensavadurioù : ar Rektoriezh ne gas ket war-raok ar c'helenn divyezhek en eil derez, n'eo ket diorroet an tañva er c'hentañ derez gant ar Stad, na gant an departamant. Araokadennoù a weler evit ar c'helenn d'an dud deuet avat : muioc'h a lañs zo gant ar c'hentelioù noz. Ezhomm bras zo er vro eus tud stummet war ar brezhoneg evit diorren an obererezhioù e-maez ar skol.

En holl ne stummer ket a-walc'h a vrezhonegerien nevez evit kempouezañ koll ar yezherien (war-dro 750 den bep bloaz). Ar pal kentañ da dizhout eo evit ma c'hellfe ar yezh sevel he c'hein.

Evit mont war an tu-se, skoazell ar bed politikel zo hollbouezus, ouzhpenn hini ar bed kevredigezhel. Dilañs zo gant Aodoù-an-Arvor : bez' eo **an departamant a ouestl d'ar brezhoneg ar budjed izelañ dre yezher**. Un tu gwan eo evit ar vro na c'hall ket tennañ splet eus oberoù kaset da benn gant an departamant hag a zo galloudus, war-bouez ar panellerezh hent. **Ar c'humunioù eo ar strollegezhioù tiriadel a zo aet ar pellañ evit lakaat ur politikerezh yezh da dalvezout e bro Treger-ha-Goueloù**. Evit en ober e vezont harpet gant ar garta *Ya d'ar brezhoneg*, bet sinet gant un drederenn eus kumunioù ar vro c'hoazh. Ur gendestenn bolitikel hag a ya war an tu mat zo e gwirionez. Ret eo ober eus ar politikerezh yezh **un ahel politikel treuz** er vro bremañ.

Met n'eo ket ingalet mat ar youl bolitikel-se er vro. Ur greizenn greñv a zeu war wel gant an tric'horn Lannuon-Plistin-Kawan. War an tu mat ec'h emdro oberoù Lannuon, kêr-benn ar vro, ha Kumuniezh-Kumunioù Kreiz Treger, siner *Ya d'ar brezhoneg*, zo ur skouer a-feson evit ar frammoù etrekumunel all. Ezhomm zo da gempouezañ ar vro en ur ziorren ar brezhoneg er vuhez foran e pennoù-kanton reter ar vro ivez.

Ar vro n'he deus ket tennet splet eus feur uhel ar skolidi divyezhek er boblañs skol c'hoazh evit diorren ar yezh er vuhez pemdeziek dre-vras : war dachenn an dudi, ar servijoù d'an dud pe ar vuhez sevenadurel. Traoù zo da c'hounit er vro, dre stummañ an dud ha dre gas da benn ul labour kehentiñ. E beli ar strollegezhioù foran emañ respont d'an ezhommoù a zeu war wel splann er vro.

Ezhomm zo da ijinañ doareoù d'ober muioc'h ha gwelloc'h war bep tachenn ha lakaat anezho da dalvezout buan evit lakaat un harz d'ar c'holl yezherien da gentañ hag evit gwelet an niver anezho o kreskiñ en-dro da eil. Unan eus al lec'hioù gwellañ eo bro Treger-ha-Goueloù evit sevel oberoù nevez da ziorren ar brezhoneg abalamour d'an dregantad uhel a vrezhonegerien zo er boblañs e-keñver ar broioù all.

Derc'hel soñj...

Sifroù pennañ ar brezhoneg e bro Treger-ha-Goueloù

- Soñjal a reer e oa war-dro 21,5% eus poblañs bro Treger-ha-Goueloù a oa brezhonegerien e 2008 (**war-dro 25 000 yezher**), **da lavaret ar vro ma z'eus an dregantad uhelañ, gant bro Kornôg Kreiz Breizh.**
- Tremen 7 500 yezher a vefe aet d'an anaon e bro Treger-ha-Goueloù etre 1999 ha 2008.
- **1 255 skoliad** eus ar vro a heuilh kentelioù brezhoneg pe e brezhoneg eus ar skol-vamm d'al lise.
- Ur **skol divyezhek** a gaver **e tost ur c'hard eus kumunioù ar vro zo dezho ur skol da nebeutañ.**
- Bro Treger-ha-Goueloù eo ar vro ma kaver **an dregantad uhelañ** a skolidi divyezhek e Breizh : **tost da 10% er skol-vamm.**
- Tremen **260 den deuet** a zesk brezhoneg dre ar c'hentelioù noz.
- E miz Meurzh 2009 e konted **21 gumun** o doa sinet ar garta **Ya d'ar brezhoneg.**
- Tost an hanter eus annezidi ar vro zo o chom er c'humunioù-se.
- Renablet ez eus **4 framm** a ginnig **klasoù dizoleiñ pe kampoù brezhonek** er vro.
- 20 % eus an titloù embannet e brezhoneg e 2008 zo liammet ouzh Kuzul ar Brezhoneg
- 110 munut brezhonek dre sizhun a resever er vro gant **France 3 Ouest.**
- Tro-dro 65 eurvezh brezhoneg a vez skignet er vro gant an holl **skingomzoù** bep sizhun.
- **56 post-labour brezhonek** a oa bet renablet e bro Treger-ha-Goueloù e 2006.
- 43 oberour kevredigezhel hag armerzhel eus ar vro o deus sinet **Ya d'ar brezhoneg.**

Ar brezhoneg en deskadurezh

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> ▪ Unan eus ar broioù m'emañ ar rouedad lec'hioù divyezhek en he stankañ. ▪ Ar vro ma kaver an dregantad uhelañ a skolidi divyezhek er poblañs skol a-bezh. ▪ Emdroadur : daougementet eo bet feur ar c'heleñn divyezhek er vro koulz ha poblañs ar skolidi divyezhek dindan 10 vloaz ▪ Diorroet madik eo ar c'hinnig kelenn d'an oadourien. ▪ Kresk gant ar c'hentelioù noz etre 2004 ha 2008 (+13%). 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Gorrekaat a ra kresk an niver a skolidi divyezhek muioc'h eget e lec'h all e Breizh. ▪ Digempouez eo ar c'hinnig etre kornôg ha reter ar vro. ▪ Lec'h divyezhek publik nevez ebet abaoe 2002. ▪ Isdiorroet eo ar c'heleñn divyezhek en eil derez ▪ Nebeutoc'h-nebeutañ a skolidi eil derez o deus kentelioù brezhoneg : brasoc'h eo an digresk er vro eget e Breizh a-bezh. ▪ N'eo ket bet diorroet an tañva er c'hentañ derez. ▪ Framm stummadur dibaouez ebet er vro evit an dud deuet. 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Diaesterioù zo atav evit digeriñ skolioù divyezhek nevez gant ar sistem zo bremañ (s.o Tredraezh-Lokemo). ▪ Diaesterioù evit aozañ ha brudañ ar c'hentelioù brezhoneg en eil derez. 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Diorren ar magourioù er vro evit kaout danvez skolidi en hentadoù divyezhek ▪ Reiñ un tañva eus ar brezhoneg er skolioù ▪ Digeriñ skolioù divyezhek er c'humunioù da respont d'ar gouleñn sokial ha da greñvaat lec'hioù ar c'hentañ derez a zo o-unan (e Plistin, e Pempoull hag e Landreger da skouer) ▪ Astenn ar c'hinnig e skolioù all er c'humunioù ma'z eus ur skol divyezhek c'hoazh (e Lannuon da gentañ-penn). ▪ Diorren an hentad divyezhek en eil derez ▪ Diorren, brudañ hag aesaat ar c'hentelioù brezhoneg en eil derez ▪ Aozañ stajoù yezh er vro.

Ar brezhoneg er vuhez foran

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> ▪ Emañ ar vro el lodenn eus an departamant ma'z eus staliet pannelloù-hent divyezhek gant an departaman : 80% eus an tiriad zo gant pannelloù divyezhek. ▪ Strollegezhioù oberiantañ Aodoù-an-Arvor a gaver er vro. ▪ Un drederenn eus kumunioù ar vro he deus degemeret ar garta YAB : ar feur uhelañ e Breizh. ▪ Labour al Levrig hag an Ofis evit broudañ ar c'humunioù da ziorren ar yezh er vuhez foran. 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ An departamant a ouestl ar budjed izelañ d'ar brezhoneg dre yezher eo departamant Aodoù-an-Arvor. ▪ Paouezet eo an departamant da skoazellañ ar frammoù a-vent "rannvroel". ▪ Estreget war ar pannelloù, ne vez ket gwelet kalz a vrezhoneg (er c'hehentiñ, en degouezhioù ofisiel, en teulioù melestradurel, en degemer,...). ▪ N'eo ket kempouez an divyezhegezh a gaver er panellerezh atav. ▪ Un implij bihan a vez graet eus ar brezhoneg gant bed an touristerezh c'hoazh. 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ N'eo ket politikerezh yezh ar strollegezhioù foran un ahel politikel treuz c'hoazh. 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Ober eus ar politikerezh yezh un ahel politikel treuz. ▪ Kreiñ gant un eil prantad staliañ pannelloù gant an departamant : mont war-zu ur sistemategezh ha gwelaat an divyezhegezh kinniget. ▪ Kempouezañ ar vro dre glask diorren plas ar brezhoneg e pennoù kanton reter ar vro da skouer (Landreger, Ar Roc'h Derrien ha Lezardrev). ▪ Ober gant un divyezhegezh kempouez ▪ Ober eus ar brezhoneg un elfenn eus politikerezh kehentiñ tiez an douristed. <p>Kreñvaat implij ar yezh e daou bol ar vro : Lannuon ha Pempoull.</p>

Ar brezhoneg er vuhez keodedel

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> ▪ Feur uhelañ ar vrezhonegerien e Breizh. ▪ Pouez kreñv poblañs an deskerien (skolioù divyezhek+kentelioù noz) evit kaout obererezhioù brezhonek e-maez ar skol. ▪ Lañs gant ar bed kevredigezhel. 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Dale zo bet tapet gant ar vro war dachenn ar brezhoneg a-raok ar skoliata. ▪ Kreizenn vakañsoù ebet er vro. ▪ Skingomz lec'hel vrezhonek ebet er vro. ▪ Kelaouenn lec'hel ebet a embannfe pennadoù e brezhoneg. ▪ E metoù ar c'helenn ez enfreder brezhonegerien er vro, kalz muioc'h eget e Breizh dre-vras. ▪ 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Mankout a ra ur frekañs e kornôg ar vro evit resev abadennoù RKB. 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Brudañ an divyezhegezh abred er gwilioutioù. ▪ Cheñch skeudenn ar yezh e penn ar re yaouank dre ginnig dezho abadennoù modern pe darvoudoù a glot gant o freder pe diouzh ar c'hiz. ▪ Diorren servijoù e brezhoneg e tiez ar retredidi. ▪ Stummañ tud war ar brezhoneg e bed ar servijoù d'an dud (magourioù, tiez ar retredidi, kreizennoù dudi). ▪ Kelaouiñ war an degemer brezhonek a c'hall bezañ kinniget gant ar frammoù dudi ma'z eus brezhonegerien.

Stagadennoù

Sifroù ar c'heleñn divyezhek dre gumun ha dre live e bro Treger-ha-Goueloù – Distro-skol 2008

	Skol-vamm	Skol-gentañ	Skolaj	Lise	Hollad
Kawan	47	46	-	-	93
Landreger	22	25	-	-	47
Lannuon	111	153	61	37	362
Louaneg	16	1	-	-	17
Pempoull	43	47	-	-	90
Perroz-Gireg	26	2	-	-	28
Perwenan	25	33	-	-	58
Plistin	45	46	-	-	91
Ploubêr	9	13	-	-	22
Plounevez-Moedeg	45	35	-	-	80
Rospezh	27	19	-	-	46
Tregastell	47	17	-	-	34
Bro Treger-ha-Goueloù	433	437	61	37	968

Sifroù ar c'heleñn divyezhek dre gumun ha dre hentad e bro Treger-ha-Goueloù – Distro-skol 2008

	Diwan	Hentad publik	Hentad prevez	Hollad
Kawan	0	93	0	93
Landreger	0	0	47	47
Lannuon	88	274	0	362
Louaneg	17	0	0	17
Pempoull	25	65	0	90
Perroz-Gireg	0	0	28	28
Perwenan	0	58	0	58
Plistin	0	91	0	91
Ploubêr	0	0	22	22
Plounevez-Moedeg	17	63	0	80
Rospezh	0	0	46	46
Tregastell	0	34	0	34
Bro Treger-ha-Goueloù	147	678	143	968

Feurioù ar c'helenn divyezhek dre gumun ha dre live e bro Treger-ha-Goueloù e 2007/2008

Kumun	Skol-vamm	Skol-gentañ	Ishollad kentañ derez	Skolaj	Lise	Hollad
Kawan	40,6%	27,1%	33,2%	0%	0%	33,19%
Landreger	18,9%	14,5%	16%	0%	0%	3,85%
Lannuon	13,4%	11,4%	12,2%	5,3%	0,9%	5,32%
Louaneg	9,1%	0,6%	4,3%	0%	0%	4,46%
Pempoull	14,6%	8,5%	10,8%	0%	0%	3,58%
Perroz-Gireg*	9,4%	0%	3%	0%	0%	1,49%
Perwenan	37,8%	17,6%	24%	0%	0%	23,85%
Plistin	38,5%	24,1%	29,7%	0%	0%	15,99%
Ploubêr	6,5%	8,8%	7,8%	0%	0%	7,76%
Plounevez-Moedeg	100%	30%	50,8%	0%	0%	50,78%
Rospezh	28,2%	6,7%	13,5%	0%	0%	13,47%
Tregastell	25%	17,1%	33,2%	0%	0%	33,19%
Bro Treger-ha-Goueloù	9,67%	6,25%	7,61%	1,28%	0,61%	4,64%

Feur ar c'helenn divyezhek dre gumun ha dre vloavezh er c'hentañ derez e bro Treger-ha-Goueloù eus 1999/2000 da 2007/2008

	1999	2000	2001	2002	2003	2004	2005	2006	2007
Kawan	12,8%	15,6%	18,5%	18,6%	22,3%	25,9%	32,7%	31,3%	33%
Landreger	9,7%	14,3%	9,5%	9,6%	14%	16,4%	16,8%	14,9%	16%
Lannuon	10,1%	10,8%	10,9%	11,8%	11,8%	11,5%	11,3%	12%	12,2%
Louaneg	-	-	-	-	-	-	-	4,2%	4,3%
Pempoull	2,8%	4,3%	6,1%	7,1%	8,4%	8,8%	9,5%	10,5%	10,8%
Perroz-Gireg		-	-	-	-	-	-	-	1,5%
Perwenan	7,7%	7,9%	10,9%	13,3%	14,5%	19,9%	21,1%	21,2%	24%
Plistin	8,7%	14,5%	17,5%	23,0%	22,8%	25,6%	26,9%	30,4%	29,7%
Ploubêr	-	3,9%	5,4%	5,7%	7,9%	11,9%	11,1%	9,2%	7,8%
Plounevez-Moedeg	-	-	-	22,3%	28,4%	31,4%	38,3%	46,7%	50,8%
Rospezh	-	-	-	-	-	16,0%	20,2%	15,8%	13,5%
Tregastell	7,9%	8,8%	9,7%	8,3%	12%	13,4%	16,7%	17,8%	20,7%
BRO TREGER-HA-GOUELOÛ	3,4%	4,2%	4,4%	5%	5,5%	6,4%	7%	7,1%	7,6%

Sifroù ar c'hentelioù noz dre gumun ha dre live e bro Treger-ha-Goueloù e 2008/2009

	Live 1	Live 2	Live 3	Live 4	Live 5	Hollad
Landreger	3	7	3	12	8	33
Lannuon	22	10	8	7	5	52
Lanvaodez					9	9
Pempoull	25	19	16	14	5	79
Perroz-Gireg	9					9
Perwenan	4	4		6		14
Plehedel		10				10
Plistin	9		7	7		23
Plouared		5				5
Tregastell		15				15
Trevoù (an)	5	9				14
Bro Treger-ha-Goueloù	77	79	34	46	27	263

Levrlennadur

- BAUDEQUIN I., Genver 2008. L'évolution de la population des 21 pays bretons de 1999 à 2005. Octant, Roazhon, 111, 17-21.
- EBSSA (emb.), Gwengolo 2003. L'espace breton. Les dossiers d'Octant, Roazhon, 45, 152 p.
- GREF Breizh (emb.), Mezheven 2007. Tableau de bord emploi-formation par pays - du Trégor-Goëlo. Roazhon, 44 p.
- Ministrerezh an deskadurezh Stad (emb.), Ebrel 2008. Projet de programmes de l'école primaire. Pariz, 55 p.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2007. Ar brezhoneg e-kreiz ar roudour – Eil danevell hollek war stad ar brezhoneg. Roazhon, 135 p.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2004. Diagnostik war stad ar brezhoneg e bro Treger-ha-Goueloù. Roazhon, 23 p.
- UBAPAR, Ebrel 2009, Klasoù hag obererezhioù dizoleiñ /classes et activités de découverte en breton pour les scolaires
- UBAPAR, 2007 Kreizennoù vakañsoù hañv 2007/ séjours enfants et ados en breton Été 2007

Mammennoù

- Al Levrig
- Bro Tregor-ha-Goueloù
- Daoulagad Breizh
- Deskadurezh Stad
- Dihun
- Divskouarn
- Div Yezh
- Diwan
- Ensellerezh akademiezh Aodoù-an-Arvor
- France 3 Ouest
- France Bleu Breizh Izel
- Radio Kreiz Breizh
- Rannvro Breizh
- Rektoriezh Roazhon
- UBAPAR
- Yezh ha Sevenadur